


DAHUD



Nina Vidovitch

gand

Gwillou **KERGOURLEZ**

teatr brezoneg penn ar bed

Bruod Nevez

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezoneg mizieg

Koumanant-bloaz : 60 lur.

K. R. P. : "BRUD NEVEZ" 893-94 P Roazon

Chekennou-bank : "Brud Nevez", 6, ru Beaumarchais

29200 BREST

Dahud

PIEON-CHOAR TEAR BREZONED PERNI-AR-BED

NEVEZ

C. Kergour

128 Rue de la République - 29000 Brest

9-11 Rue de la République - 29000 Brest

128 Rue de la République - 29000 Brest

Eur

gand

Gwilou Kergour

128 Rue de la République - 29000 Brest

NEVEZ

128 Rue de la République - 29000 Brest

PEZIOU-C'HOARI TEATR BREZONEG PENN-AR-BED
bet embannet gand BRUD NEVEZ

G. Kergourlez: Bitek-le.

J.M. Synge: Lapous-den Penn-ar-bed.

P.J. Helias: Egile - The other 'un.

Brendan Behan: An Ostaj.

Dario Fo - R. Derrien: O Chezuz!

I.S.S.N.: niv. 0399-7014.
Peb gwir miret striz gand Gwillou Kergourlay, Teatr Brezoneg Penn-
ar-Bed, ha Brud Nevez.

Brud Nevez: 6, ru Beaumarchais, 29200, Brest.

Dahud

Arvest kenta

Merh Gradlon

pe

Eur vojenn vuzuduz

gand

Gwillou Kergourlez

BRUD NEVEZ

KOMEDIANED

C'hoariet eo bet ar pezh-mañ evid ar wech kenta gand: (1)

Ar beleg.....	Gwenn Kaigre
Ar foll.....	Sylvain Kermoa
Ar gedour.....	Andre Morvan
Ar marhadour kenta.....	Silvi Vigouroux
An eil marhadour.....	Chan Perrod
An telennour.....	Yann Kervoas
Dahud.....	Mari Kermareg
Erwan.....	Jakez Andrew
Ar barz.....	Annaig Abjean
Ar priñs.....	Emilien Balcon
Ar martolod kenta.....	Remi Derrien
An eil martolod.....	Andre Morvan
Ar habiten.....	Gwenn Kaigre
Ar hlasker bara.....	Yann Kervoas
Paotr ar radio.....	Andre Morvan
Paotr e akordeoñs.....	Yann Kervoas

Kinkladurioù: bet treset gand **Skol an Arzou-Kaer**, e Brest.
Dillajou: **Strollad Penn ar Bed**, treset gand **Nina Vidrovitch**.
Sonerez: **René Abjean, An Triskell**.
Skritlell: **Nina Vidrovitch**.
Dillad - Make-up: **Janet Ommrod**.
Leurennet eo bet ar pezh gand **Gwillou Kergourlay**.

C'hoariet eo bet **Dahud** evid ar wech kenta e brezoneg, e Brest, d'an 21^a viz genver 1982, gand strollad **Teatr Brezoneg Penn-ar-Bed**.

Bez' eo **Dahud** an 12^{ved} pezh da veza c'hoariet gand ar strollad.

(1) en urz ma teuont war al leur-c'hoari.

Arvest kenta

E Ker-lz d'indan vor. E-kreiz al leurenn ez eus eun aoter, eur beleg en he hichenn, prest da vond da lavared an overenn. Dirag al leurenn ez eus eur foll o hoari gand pempigou. An daou-mañ a jom en o flas tra ma tremen ar re all evel margodennoù Jakamar.

Da ziwall: c'hoari ar foll a zo a-bouez kén-kén kar diouz e lusk e vo c'hoariet lodenn genta ar pezh beteg ma tegouezo Erwan.

Ar beleg: Piou 'n-ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Unan...daou...tri...pevar...pemp ha hop!

Ar beleg: Piou 'n-ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Unan, daou, tri, pevar, pemp ha hop!

Ar beleg: Piou 'n-ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Unan...daou...tri...pevar...pemp ha hop!

Ar gedour: (o treuzi pennfollet toud). Digoret eo bet ar skluziou... Digoret eo bet ar skluziou!!!

Ar beleg: Piou 'n-ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Unan...daou...tri...pevar...pemp ha hopala!

Ar marhadour kenta: (o tond tre) Med geo, med geo! Degouezoud a ray.
Tri devez dale a zo netra evid eur vatimant. Ma ne zegouezo ket hirio, e
teguoizo "benn warhoaz.

An eil marhadour: Tregont kasedad mein presiu! -

Ar marhadour kenta: Bez' po 'neze: "benn warhoaz e vo deiz c'hoaz. (*mond
a reont er-mêz*).

Ar beleg: Piou 'n-ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Unan...daou...tri...pevar...pemp ha hopala!

Eur vamm: (o *ouela*) Ma merh, ma merh. N'eo ket bet distroet d'ar gêr henoz!
Piou 'n-ije gwelet ma merh? N'eo ket bet distroet d'ar gêr henoz. Piou 'n-ije
gwelet ma merh?

Ar foll: Unan, daou, tri, pevar, pemp ha hopala! O kousked 'ma gand eur
galant bennag, sur mad.

Ar vamm: (o *kuitaad*) Ma merh! Ma merh vihan!

Ar foll: Unan...daou...tri...pevar...pemp ha hopala!


Ar beleg: Piou 'n-ije c'hoant respont an overenn? Piou 'n-ije c'hoant respont
an overenn?

An telennour: (*Dond a ra tre gand e delenn; ober a ra van c'hoari peogwir
n'eus kordenn kordenn ebed kên*).

Pa vim braz on—daou
e laras din eun deiz,
pa vin Rouanez
ha pa vloh Roue
F kouskim asamblez on—daou eun deiz,
Bugale oam neuze
Hag abaoe an amzer—ze
Dahud he—deus chañchet
ano he galanted.
(*Laret*) 'M—eus ket soñj kên. Pegiz ' oa dija? E—giz an delenn—mañ eo ma
halon. Plijoud a rafe dezi kana med ne hall ket; torret eo he herdin.

Bugale oam neuze,
Hag ar vuhez eun huñvre,
Eun huñvre a ya hag a dro,
Gand an amzer oh ober he zro.

Dahud: (*Eur hoaradenn hir*) Peoh! 'm—eus laret deoh.



Ar galant kenta: Kared 'ran 'hanoh, Dahud.

Dahud: Ya, ya, ha me ivez!

An eil galant: Adori a ran 'hanoh, Dahud.

Dahud: Ha me kemend—all... Ha gwelet 'pefe ma friñs?

An eil galant: Kared 'ran 'hanoh, Dahud.

Dahud: Daoust hag ho—pefe gwelet ma friñs?

An eil galant: Eet eo kuit deh da noz.

Dahud: Foll, ha gwelet 'pefe ma friñs?

Ar foll: Daou vil vloaz zo 'ma eet kuit, laran deoh...Unan...daou...tri...pevar...pemp ha hopala!

Dahud: Pegiz oa eñ?

Ar foll: Unan...daou...tri...pevar...pemp ha hopala!

Dahud: Eul lapous—den oa?

Ar foll: Skopa a ree tan dre doull e fri. Korneg beg e dreid ha korneg beg e dal, c'hoarz an diaoul en e veg...unan...daou...tri...pevar...pemp ha hopala!

Ar beleg: Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn?

Dahud: Beleg! Daoust hag ho—pefe gwelet ma friñs?

Ar beleg: Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn?

Eun tremener: Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn? (*O hoarzin en eur vond 'mêz.*)

Ar marhadour kenta: Eo, eo...eo...eo...

An eil marhadour: Ma batimant...ma batimant...

Ar gedour: Digoret eo bet ar skluziou... Digoret eo bet ar skluziou... N'eus nemed dour...dour. (*Mond a ra er—mêz.*)

An eil marhadour: Ma batimant...ma batimant... Kollet ganin ma batimant! *Mond a ra er—mêz, heuliet gand ar beleg.*

Ar beleg: Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn?

Dahud: Ma Friñs!... Peleh ema ma friñs? (*Mond a ra er—mêz.*)

An telennour: (*o tivoema*)

Pa vim braz on—daou

E laras din eun deiz...

Dahud! Dahud!

(*Mond a ra er—mêz.*)

Ar beleg: Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Unan...daou...tri...pevar...pemp ha hopala!

Ar beleg: Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn?... Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn? Daou vil vloaz zo e vez klevet ar memez diskan gante. Torr—penn int a—benn ar fin! Unan... daou... tri... pevar...pemp ha hopala!

Daoust hag a zo unan e—neus c'hoant respont an overenn? Daoust hag a zo unan e—neus gwelet ar pñs? Benn ar fin...

Ar gedour: Eet eo an eskob hag ar roue kuit euz kêr. Digoret eo bet ar skluziou. Beuzet eo Kêr—Iz... Dour zo hed—ha—hed... Dour...

Ar foll: Ale, deom dezi. Deom dezi. Harz d'an tan... Unan... daou... tri...pevar...pemp ha hopala! Ne daolont ket kont, med an amzer a ra he zro. E penn kenta e kaven 'heze fentuz, med dibaoc 'n amzer memestra... Feiz... Unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala! Ne zoñjent ket en dour—beuz. Beva a reent. Beva ha kousked. Kousked an eil gand eben, en eil gand egile; eun taol daou doull pe eun toull daou daol. Dond ha mond pe mond ha dond...

Med me a wele ar pez a oa da zond. Med... Sod on, c'hwi oar. 'Blamour da ze... unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala! Sant Gwenole a wele ar pez a oa da zond ivez. Laret 'm—oa deze, med n'eus ket faotet deze selaou... A—benn ar fin 'ma eet kuit gand ar roue hag eun devez eo degouezet ous—penn ha leun ar volenn. (*O hoarzin.*) Re wir e oa... Setu beuzet ar gêr vraz didan ar mor... unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala!

Ar beleg: Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala! Dre faot Dahud an hini eo. Perag eo bet troet he fenn dezi gand ar pñs; eun estrañjour 'giz ma lare—hi... 'fin...unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala! Me, me ouie mad piou oa... Med sod on, c'hwi oar!... Feiz... unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala! Anavezet 'm—eus 'hezañ dioustu. Goud a ouie ar pez a faote dezañ. Beuzi an oll didan ar mor: prizonidi... hi! hi! hi!... Pñs ma...

Ar beleg: Piou 'n—ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Evid dond 'mêz euz amañ: toull—hent ebed. N'eus nemed eun den euz bed ar re veo gouest da liberi 'hanom. Me a oar se ivez. (*O tiskouez*)

ar beleg). Hemañ a oar ivez. Ma teufe unan bennag da respont e overenn, e pignfem d'an neh endro hag e teufe Kêr-lz da vout ar pezh eo bet a-viskoaz: Kêr-gapital Penn-ar-Bed.

Ar beleg: Piou 'n-ije c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Moyenn zo deom gortoz. N'eus kristen ebed kên 'barz ar gêr-mañ. Ha ma teufe unan, e lakfe dioustu Dahud he hrabanou warnañ. Ha hepdale! 'Barz he gwele! Hag an deiz war-lerh, e kavoh 'nezañ maro-mik, eur gor-denn gantañ tro d'e houg. Setu ar pezh he-deus greet beb taol. N'eus nemed ar priñs... N'eus nemetañ a zo deuet a-benn deusti... Unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala!

Ar beleg: Piou 'n-ije c'hoant respont an overenn?

(Eur pennad, taoliou kreñv dre ar gêr vraz. Telenn ha gong ha trouz ar momeder oh en em lakaad da vond endro.)

Ar foll: A 'ta! Traou nevez.

Eur vouez: Degouezet zo unan bennag... Degouezet zo unan bennag... Trei a ra an amzer endro!

Unan koz: (*gand eur houlaouenn*) Dihunit! Dihunit! Krenet 'n-eus an douar. Deuet zo eun estrañjour tre ha skrijet o-deus ar mogeriou. Dihunit. Dihunit oll! Troi ra an amzer endro. (*Brall ar hleier*).

Ar marhadour kenta: (*Dond a ra en eur zañsal*). Trei a ra an amzer endro! Trei a ra an amzer endro! Sod on... Sod mik... Sod-nay on... Trei a ra an amzer endro. Saveteet om!

An eil marhadour: Petra larit aze?

Ar marhadour kenta: E laran deoh e vo kontet hoh euriou deoh azaleg bremañ. N'oh ket eternal kên. Hastit buan da veva ho puhez, m'ho-peus ket c'hoant mervel a-raog 'po bevet.

An eil marhadour: 'Gomprenan ket.

Ar marhadour kenta: N'eus netra da gompren. Lezit 'hanon mond gand ar vatimant hag e welim an douar braz a-raog an noz.

An eil marhadour: An douar braz?

Ar marhadour kenta: Degouezet zo bet eun den, kompren a rit? Deuet eo da zavetei 'hanom. Kompren rit, pe ne rit ket? Ar hoñvers a zo o vond da gomañs endro.

An eil marhadour: Ar hoñvers?

Ar marhadour kenta: A! a-benn ar fin! Komprenet 'n-eus. Ya, ar hoñvers, ar marhad, ar batimañchou. (*En telt e vez klevet eur bagad sonerien; treuzi a ra d'an daoulamm al leurenn an telennour, ar vaouez...*).

An eil marhadour: Da beleh 'maint' vond ken buan?

Ar marhadour kenta: Da zaludi ar zalver. Deom 'ta. (*Muzik ha trouz braz. Chomet eo ar Foll hag ar Beleg en o flas. Euz a beb korn euz kêr e teu moueziou disheñvel war greñvaad, trouziou moueziou, e-giz ma vije bet eur foar vraz mod-koz.*)

(Dond a ra tre Erwan hag an trouz a ya war vihannaad. Estonet e seblant beza, setu ma lavar d'ar Foll):

Erwan: Demad!

Ar foll: Unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala!

Erwan: Salut! Piou oh-c'hwil?

Ar foll: Unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala!

Erwan: Unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala!

Erwan: Lakeet 'peus ho teod 'barz ho potez? Goulenn a ran diganeoh peleh 'maon degouezet?... Bouzar oh pe betra? Petra eo ar muzik-se?

Ar foll: Chitit... chitit...

Erwan: Perag chiti?

Ar foll: Ne hallan ket respont... 'M-eus ket c'hoant respont... En diabarz ema an traou ganin, amañ hag amañ. (*O tiskouez e benn hag e galon*). Gand-ze ne hallan ket en em vankoud. Mod ebed... Chitit!

Erwan: Sod eo hemañ pe betra?

Ar foll: Marteze 'walh.

Erwan: Pegiz marteze?

Ar foll: Ma chom mud an den fur, pegiz lared eo fur? Marteze 'ma sod. Med ma chom mud an den zod, pegiz lared eo sod. Marteze 'ma fur. Etre an den fur hag an den zod, pegiz lared piou zo piou, kar ma chomont mud o-daou e chom ar rezon gante o-daou.

Erwan: Iskiz! (*D'ar beleg*) Ha c'hwil? Eur respont bennag 'mo ganeoh?

(Dond a ra tre an telennour, ar varhadourien, ar gedour...)

Ar marhadour kenta: Gast! Eun tasmant an hini eo hag a zo degouezet pe betra?

Ar gedour: Med pa laran deoh 'm-eus gwelet 'nezañ e-giz ma welan 'hanoh.

Ar marhadour kenta: Ha kôzeet peus outañ?

Ar gedour: 'M-eus ket.

Ar marhadour kenta: 'Peus ket!

An eil marhadour: Hep!

Ar marhadour kenta: Petra zo?

An eil marhadour: Sellit du-ze!

Ar gedour: Setu an den. Moyenn zo deoh mond da gêzeal gantañ.

Ar marhadour kenta: Perag ne yafeh ket c'hwi?

An eil marhadour: Ha perag e yafen-me?

Ar marhadour kenta: Deoh da vond.

An eil marhadour: Deoh eo.

Ar marhadour kenta: (O vounta anezañ). N'eo ket, deoh eo.

An eil marhadour: Daoust hag... daoust hag... ho-pefe gwelet ma batimant? ... Eur galer daou bont leun gand spisou ha danvez, ha tregont kasedad mein presiu.

An telennour: Kasit ahanon ganeoh beteg bed ar re veo. Kasit 'hanon ganeoh.

Ar vamm: Ha gwelet 'pefe ma merh? N'eo ket bet distroet d'ar gêr... deh da noz...

Ar marhadour kenta: Peoh ganeoh, kazez koz!

An eil marhadour: Larit din kentoh 'barz peleh 'ma chomet ma batimant. Me roy deoh an hanter euz ar pez zo 'barz.

Ar marhadour kenta: Euz peleh 'maoh o tond?

Erwan: (o hoarzin) Gweloh e vefe deoh laëred din peleh 'maon da genta.

Ar marhadour kenta: Perag?... Ne ouezit ket?

Erwan: 'Ran ket, peogwir e houlenan diganeoh.

Ar marhadour kenta: 'Barz Kêr-lz 'maoh.

Erwan: Kêr-lz, ar gêr villiget?

Ar marhadour kenta: Ya, Kêr-lz, ar gêr veuzet.

Erwan: Pegiz n'oh ket maro, neuze?

Ar marhadour kenta: Ha perag vefem?

Erwan: Daou vil vloaz zo 'maoh didan vor, 'maoh ket?

Ar marhadour kenta: Daou vil vloaz zo? Kement-se?

Ar foll: (Oh en em lakaad da hoari endro). Dam ya. An amzer a ra he zro... Unan...daou... tri... pevar... pemp ha hopala!

An telennour: Deuz an douar 'maoh o tond neuze?

Erwan: Hag emañ.

An telennour: Ha pegiz 'ma eñ?

Erwan: An douar 'n-eus ket cheñchet, koz evel ma oa, hag a zo. Chezuz! Peseurt istor! Den 'bed ne gredo 'hanon... Kêr-lz, koulskoude 'maon ket o huñvreal. Med larit din... Petra peus greet abaoe 'n amzer?

Ar marhadour kenta: Larit deom penaoz 'ma an douar.

An telennour: Ya, kontit deom penaoz 'ma an douar.

Erwan: Che yey yey.

An telennour: Penaoz 'ma an douar?

Erwan: Ront.

An telennour: Pegiz...ront?

Erwan: Ront. Petra faot deoh, ront eo an douar, n'eo ket? (O tiroll da hoarzin). A! Med, gwir eo, ne ouezit ket evel just! Ront eo an douar. Dam ya, ront'eo. Kompren a rit? ha koulskoude e tro - Galileo - 'Peus ket klevet preg deus-tañ? Ugent kantved dale! Ha mond war-raog, ne ouezit ket petra eo? Eun

oto? An tele, an elektronik? Nann, ne rit ket? An elektrisite? Eur bouton da boueza ha goulou ba'n ti. Eun heol o lugerni war eun orjalenn. Uraniom? Eun heol hag a darz a-uz d'on fennou... Ket?

An telennour: An heol. Ya.

Erwan: Ar batimañchou.

An eil marhadour: Ar batimañchou... Larit deom penaoz 'maint.

Erwan: Ken braz hag ar gêr-mañ. Poñchou braz kén-kén, treñiou, kirri-nij, barrajou, henchou didan-zouar. Setu ' pez eo mond war-raog.

An eil marhadour: Ha mond a ra ar hoñvers mad endro?

Erwan: Hag e ya, ya! Marhadourez leun ar porziou! Leun e strad ar bagou. Mond a ra endro ar hoñvers, an aferiou, an argant, al luks, ar manerioù, ar vuhez euruz, Las Vegas, Honolulu, ar «h-côte d'Azur». Ar vuhez euruz, kwa! e-giz hini ar rouaned...

Ar marhadour kenta: C'hwil die beza euruz, neuze!

Erwan: Ya!... 'fin. Evidon, n'eo ket gwir toutafed.

Ar marhadour kenta: Ha perag 'ta?

Erwan: Me, n'on nemed eur paour-kêz mekanisian bigi.

Ar marhadour kenta: A 'ta!

Erwan: Ar re o-deus argant o-deus ar pezh a garont.

An telennour: Na pegen euruz ar re o-deus argant.

Erwan: Eun deiz a vo hag o-do argant toud an dud. Mond a raint 'samblez dom-ha-dom. Ne vo kén na baour na binvig, na brezel na boan. Padoud a ray o buhez en eurusted da viken dre hras ar progré hag ar skiantchou.

Ar foll: Piu zo sod amañ?

An eil marhadour: Med ar hoñvers?

An telennour: Daoust hag ez eus c'hoaz heol, sklêrijenn ha gwez war an douar?

Erwan: Hag ez eus.

An telennour: Hag ar merhed?

Erwan: Brao int bepred.

An eil marhadour: Hag ar hoñvers?

An telennour: Kontit deom 'ta!

Erwan: Petra, ar merhed?

An eil marhadour: Ar hoñvers kentoh.

An telennour: Pas, ar merhed kentoh.

An eil marhadour: Ha kaoud a ra deoh e teuin 'benn da gaoud ar vuhez euruz-se gand tregont kasedad mein presiuz?

Erwan: 'Gav din ya.

An eil marhadour: Red eo din klask 'neze endro neuze.

Ar marhadour kenta: Martolod, kasit ahanom ganeoh.

Ar vourhizien all: Ya, kasit ahanom ganeoh beteg du-ze.

An telennour: (o tañsal) Din an heol, ar merhed, ar bleunioù, dir... r muzik... med peleh 'ma Dahud? (*Mond a ra er-mêz. Adkregi a ra ar muzik braz!*)

An eil marhadour: Kregi ' ray ar hoñvers endro. Bez' vin pinvig-mor.

Ar foll: Degouezet int sod, oll 'he... Unan... daou... tri... pevar... pemp ha ho-pala! (*Dañsal a reont oll*)

Ar marhadour kenta: (*Tre 'ma ar re all o tañsal*). Me 'm-eus ijinet eur sistem 'barz ma fenn. Ijina a rin eun dra nevez hag e kanin e veuleudi evid ma teufe neseder evid toud an dud, muioc evid ar bara d'an den. Med evid kaoud 'nezañ e vo red kaoud argant, ha peogwir e renin ar finañs, e vo red deze labourad evidon. Ez eo, n'eo ket? Pres zo warnon mond war an douar endro. (*En em lakaad a ra da zañsal ivez*).

Ar vamm: Ma merh a roin deoh.

Ar marhadour kenta: Hep, 'n hini zod! Hastit buan. 'Maom o vond da zistrei war an douar braz endro.

Ar foll: Amzer zo.

Ar beleg: Breudeur ha c'hoarezed, gortozit, mar plij... (*Diskenn a ra gous-tadig. Harpa a ra ar muzik*).

Ar foll: Selaout 'ta! Eur brezegenn bremañ.

Ar beleg: Pennou brell 'hanoh! Daoust hag e chomo Kêr-lz eur gêr villiget da viken, brein beteg en em zistruja euz an diabarz? Daoust hag eo re nebeud amzer ugent kantved evid ma komprenfeh eo dre ho faot ar gwalleur hag a zo en em gavet ganeoh?

Ar barz: Dre faot Dahud 'ni eo.

Ar beleg: Ha setu-te, Barz! Dre faot Dahud! Re êz e vije! Dre faot Dahud. Dre faot an oll, ya. Piou ahanoh 'n-eus ket bet c'hoant e-kreiz e galon mond da gemer e blijadur gand Dahud dre guz? Piou 'n-eus ket 'ta? Stoui a rit ho pennou. Pep hini 'hanoh 'n-eus bet c'hoanteet Dahud en desped d'he galanted hag a veze kavet krouget bemdez—Doue ha goude taolet er mor. Pep hini 'hanoh! Ar merhed zoken a gemere o flijadur ganti. Kompren piou 'gar. Ma 'pije ket bet kemend a lor e donder ho kalon, kemend a ebatou e Kêr-lz, ha ma 'pije bet en ho ilizou, na pa vefe eun den 'metken da respont an overenn, Kêr-lz ne vije ket bet beuzet jamez ha Dahud ne vije ket bet da veza priñsez villiget on daonedigez. Ho pehejou an hini eo hag a zo penn—Roz d'ho kwalleuriou!

Ar foll: Dond a ra brao gantañ.

Eur bourhiz: (d'ar foll). Serrit ho peg!

Ar beleg: Ha daou vil vloaz war—lerh e tegouez eun den gouest da zavetei ahanom, c'hwi gav deoh e kendalhoh da hoari ha da laerez? Eur gêr zante-laet ha deread hag e faot d'an Aotrou Doue kas war an douar evid ma vije eur skwer vad d'an oll. Red eo deom beza saveteet oll asamblez.

Estrañjour, badezet oh? Peseurt ano 'peus?

Erwan: Erwan.

Ar beleg: Erwan, c'hoant 'pefe respont an overenn? (*Dond a ra Dahud tre, e feson eur rouanez, heuliet gand an Telennour. Difiñv e chom an oll. Selled a reont outi.*)

Dahud: O! Pebez estrañjour brao! (*Trei a ra endro dezañ*). Priñs?

Ar beleg: Merh Gradlon! Poent braz eo deoh lakaad eun termen d'ho follentez ha selaou mouez ar rezon. An den—mañ a hell savetei 'hanom. O tond euz an douar ema.

Dahud: Euz an douar? Bet 'm-eus bet eur helenner koz e—neus desavet 'hanon. Desket 'n-eus bet din ar fizik ha strobinnerezh a beb seurt. Greet veze Marzin deustañ. Petra eo deut da veza?

Erwan: Kontet 'deus din ma mamm e oa eef diwar—wel en eur hoad braz, prizoner ma oa gand eur vaouez.

Dahud: Gand eur vaouez! (*o hoarzin*) Fentuz eo, 'gav ket deoh? Ha den 'bed ne hell liberi 'nezañ?

Ar beleg: 'Maoh ' klask strobinnella 'nezañ ivez. N'eo nag ar mare nag ar houlz.

Dahud: Deom kuit euz amañ. Deuit ganin. O rei skwer fall emañ adarre.

Ar barz: N'it ket ganti, Erwan. Erwan, daoust hag eo brao an amzer war an douar?

Erwan: Bez' eus eno heol da hweza ar frouez ha da rouza krohenn ar merhed.

Dahud: Heol splann... war an douar (*Mond a ra war—du an nor evid mond er—mêz*).

Ar barz: N'it ket d'he heul, paotr paour! N'anavezit ket 'nezi. En he horv ema he follentez! Red vo deoh redeg ar bed evid mond d'he heul. Dond a reoh sod ganti, c'hwezed ray an tan er bed oll.

Dahud: Aon 'peus rag an tan?

Ar beleg: Selaouit ahanon, Dahud. An den—mañ a hell savetei ahanom oll. N'eus nemed penndaoulina amañ ganeom evid respont an overenn hag e kemerim plas e bed ar re veo endro.

Dahud: Dizoñjal a rit eun dra bennag, Beleg.

Ar beleg: Ha petra 'ta?

Dahud: Galloud a ra kas gantañ ar vaouez a blij dezañ, hag e chomo 'tousesk ar re veo keit ha ma karo 'nezi.

Ar beleg: Gwir eo, dizoñjet 'm—oa.

Dahud: Keit ha ma karo 'nezi. Klevet 'peus, Erwan? Keit ha ma karo 'nezi, Erwan.

Ar beleg: Dahud, ma chom eur zantimant glan en ho kalon c'hoaz, selaouit 'hanon. Ho tad...

Dahud: Ma zad? 'M—eus tad ebed kên. Dilaosket 'n—eus 'hanon o tehi kuit gand Gwenole dirag an dour—beuz. Klasket 'm—oa chom ' skourr ouz e varh. Distaolet 'n—eus 'hanon, en hoh ivern. 'M—eus den 'bed kên... nemedoh, Erwan.

Ar beleg: Eun den santel e oa ho tad. O hortoz ema 'hanoh er baradoz.

Dahud: Ar baradoz! Dalhit ho paradoz ganeoh-c'hwi. Ar pezh a fell din eo eun dachennig douar da lakaad ma zreid. (*da Erwan*) ha marteze kreuh eur skoaz da glucha ma fenn pa vin skuiz euz an noz. Mil c'hoant 'm-eus gwelad an douar endro, dalhit ho paradoz ganeoh.

Ar beleg: Gwelad a reoh an douar, Dahud, med ganeom-ni, gand ho pobl. Or Rouanez ollhalloudeg e vloh e-giz gwechall hag e vim saveteet oll 'samblez.

Dahud: Me 'm-eus c'hoant beza saveteet ma-eun.

Ar barz: O toui emei! Petra 'oan o lared deoh? C'hoant 'deus boud saveteet heh-eun. (*Tufa a ra war al leur.*) Delit! Riñsit ho peg gand an dra-ze. Goulenn a ran ma vije taolet 'mêz euz kêr gand morhisti ha tousigi, dezi d'en em ruil en o glour da virviken.

Ar beleg: Den ebed ne vo taolet 'mêz. Den ebed. Peseurt Pastor ne lezfe ket e zefived o-eun evid mond da glask eun oanez kollet? Red eo deom beza saveteet oll 'samblez. Perag 'n-i-je ket Dahud droad da weled an douar endro eveldeom-ni?

Ar barz: Komz a rit evel al leoriou santel. Setu ma respont: pa vez brein eun aval 'barz ar bern, e vez taolet kuit. Klevet 'peus 'nezi. Faota ra dezi beza saveteet he-eun. Ha me a lavar deoh e faota din beza saveteet da vad, ha ma ne faot ket deom e vije eun ivern nevez on buhez war an douar, eo dao deom taol Dahud 'mêz a-raog ma vije re zivezad.

Dahud: O kôzeal adarre! Ale, deom kuit... Erwan.

Ar barz: Klevet 'peus? Klevet 'peus ar hast femelenn-ze? Mod-se ree gwechall gand he galanted: Morvan, Mabgael, Konan, Gwenmarh hag ar re all... Klevet 'peus?

Dahud: Deom kuit on-daou. Kasit 'hanon ganeoh. Ruza a rin dirag ho treid evel eur giez e heol ar hreisteiz. Deom-ni gwrez an nozveziou hañv. Deom-ni an douar tomn o huchal e hoant e kan ar griled. Deom-ni stered an oabl o tevi gand ar garantez heb en em floura, jalouz euz on daou gov kemmes-ket er geot... En em unani a rim dirag ar bed-oll. Ho saez a deho kuit hag e vin tro-ha-tro ho kwareg hag ho pal e leh ma tired ar vuhez, e glizi ar maro.

Ar barz: Tapit 'nezi!

Dahud: Erwan, daoust hag ema brao war an douar?

Ar barz: Na zellit ket deusti, Erwan. Na zellit ket deusti, Erwan!

Ar beleg: Erwan, ha respont a rafeh an overenn?

An telennour: (*o tiredeg.*) O! Pegen brao eo hi! Dahud man Douez, Dahud!

Ar barz: Ampechit 'nezañ tostaad deusti 'ta!

An telennour: Laoskit 'hanon! Laoskit 'hanon 'ta! Dahud, kared a ran 'hanon Deuit da zavetei 'hanon. Na zilezit ket 'hanon! Lezit 'hanon da vond! C'hoant kôzeal 'm-eus ganti.

Ar barz: Ne welit ket ema o klask ampech 'hanom da weled an douar endro?

An telennour: Lezit 'hanon da vond. Ne vern ket din ma ne welan ket an douar endro. 'M-eus ket c'hoant euz ho tamm douar patatez. Dahud an hini eo a faot din kaoud. Dahud! Selaouit 'hanon! Dahud, eun dra bennag 'm-eus da lared deoh. Perag e sellit dalhmad ouz an estrañjour-ze? N'ema ket euz ar vro. Sellit deuston. Gorig on. 'Peus ket soñj euz Gorig? Ni veze 'hoari 'samblez on-daou pa oem bihan. Lezit 'hanon da vond 'ta! O hoari vezem 'samblez hag e lareh bepred:

Pa vim braz on-daou
ha pa vin rouanez,
C'hwi a vo ma roue
hag e kouskim asamblez.

Soñj 'peus? Savet 'm-eus bet greet eur zonenn evidoh diwar-ze. Sellit ouzin! Perag harpit 'giz eur peul mod-se dirag an estrañjour-mañ? Gorig on. Ha soñj 'peus?

Dahud: Erwan...

An telennour: Gorig... Gorig eo ma ano.

Dahud: Erwan, daoust hag ema brao war an douar?

An telennour: Gorig. C'hwi dlefe kaoud soñj.

Ar barz: Kasit hemañ kuit 'ta!

Dahud: Erwan, daoust hag a zo heol ha sklêrijenn?

An telennour: (*Tra 'maer o kas 'nezañ kuit*) Gorig! Gorig! Gorig eo ma ano muzikaner euz ma micher.

Ar foll: Unan zod ouspenn. Unan... daou... tri... pevar... pemp, hopala!

Ar barz: Setu ar pezh a hoarvez gand he mignoned. Gast diaoulez anezi!

Dahud: Erwan, ha kared a rit 'hanon?

Erwan: Ya, Dahud, ho kared a ran.

Dahud: Pegeid e karoh 'hanon?

Erwan: Da viken, Dahud.

Dahud: Neuze e vevin da viken.

Erwan: Ha perag 'ta?

Dahud: Kosen 'vevin keit ha ma karoh 'hanon.

Ar barz: (*d'ar beleg*) .Med grit eun dra bennag, c'hwi, e-leh chom plantet 'giz eur penn-peul aze.

Ar beleg: Lezit ar vaouez—se da vond.

Ar barz: Med pas! an eskemm. Hemañ ne gompren nemed a—dreuz. (1)

Ar beleg: Lezit ar vaouez—se da vond. Ne welit ket e hell an den—ze save—te! 'hanom heb kaoud Dahud d'e heul. (*Dieubi a reont anezañ. Mond a ra Dahud kuit en eur hoarzin*).

Ar barz: Erwan, sellit piz. Ar gêr—mañ a zo deoh; 'peus nemed eun dra d'ober: respont an overenn ha kentiz war an douar e vich lakaet da roue.

Dahud: Erwan. (*Seni a ra eun orolaj.*)

Ar barz: Ha kleved a rit ar hleier? Kleier Kêr—iz o son an eur. Dibaoc daou vil vloaz zo 'deus ket greet. En em lakaet 'n—eus ar momeder da vond endro abaoe 'maoh deut tre. Luskell a ra or buhez e dasson ho kalon.

Erwan: Lammad a ra ma halon nemed evid Dahud. Med kalon Dahud ne faot ket dezi lammad evidoh. Heb kenavo! (*Mond a ra Dahud 'mêz*).

Ar barz: Dahud, plah kollet! Deuit endro... Erwan, deuit endro...

Ar beleg: Ha piou 'n—efe c'hoant respont an overenn?

Ar barz: Dahud, distroit 'ta! Dahud! Erwan! (*Mond a ra 'mêz ar barz.*)

Ar beleg: Piou 'n—efe c'hoant respont an overenn?

Eur vaouez: Harpa a ra an amzer he zro... Harpa ra an amzer he zro...

Ar foll: Setu ma krog an traou endro... Unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala!

Ar beleg: Piou 'n—efe c'hoant respont an overenn?

An eil marhadour: Ma batimant... ma faour—kêz batimant...

Ar beleg: Piou 'n—efe c'hoant respont an overenn?

(1) ar hontrol.

Ar foll: Unan... daou... tri... pevar... pemp ha hopala!

An telennour: (*o tremen*) Pa vim braz on—daou, e laras din, eun deiz e vin rouanez ha c'hwi vo roue...

Ar vaouez: Ma merh... ma faour—kêz merh!

Ar beleg: Piou 'n—efe c'hoant respont an overenn? (*pemp pe c'hweh gwech*). *Digreski a ra ar goulou. Trouz eur horn—boud: hobadennou: Dahud! Ar goulou o tizoloi ar priñs hag a oa aze e—pad an arvest kenta.*

(1) ar hontrol.

Ar marhadour kenta: Piou 'n—efe c'hoant respont an overenn?

Ar eil marhadour: Kevit a ra e arger.

Ar marhadour kenta: N'eo ket bet gwelloc'h 'vad klevoc'h.

Ar eil marhadour: N'eo ket bet gwelloc'h 'vad klevoc'h. N'eo ket bet gwelloc'h 'vad klevoc'h. N'eo ket bet gwelloc'h 'vad klevoc'h.

Ar marhadour kenta: Senit ar batimant an.

Ar eil marhadour: He batimant an. He batimant an. He batimant an. He batimant an.

Ar marhadour kenta: Senit ar batimant an.

Ar eil marhadour: Senit ar batimant an.

Ar marhadour kenta: Senit ar batimant an.

Ar eil marhadour: Senit ar batimant an.

Ar marhadour kenta: Senit ar batimant an.

Ar eil marhadour: Senit ar batimant an.

Ar marhadour kenta: Senit ar batimant an.

Eil Arvest

(*Er mor, e bourz eur chaluter. Goude merenn-greisteiz. Heol splann.*)

Ar martolod kenta: Petra 'ma-eñ oh ober 'ta?

An eil martolod: Kemer a ra e amzer.

Ar martolod kenta: N'eus ket bet aksidant 'bed koulskoude.

An eil martolod: N'eus ket 'vad! Taol a ra evez ha goud a oar neual mad-tre. Me zo sur ema en tu all euz ar vag, ' skourr ouz eur fun, e benn 'mêz an dour, oh ober fout deustom-ni.

Ar martolod kenta: Stenn eo bepred ar fun.

An eil martolod: Ne gomprenan ket mann ebed. A-greiz toud om chomet staget ouz strad ar mor. Ha setu distaget om bremañ.

Ar martolod kenta: Boulhurun! Kemeret 'n-eus e amzer.

An eil martolod: Amzer a-walh 'n-ije bet da... gemer e blijadur.

Ar martolod kenta: Ar pezh 'm-ije kredet ivez... ma ne vefem ket bet pemp leo euz an douar braz.

An eil martolod: Setu 'ma ' tond.

Ar martolod kenta: Nondedie! Che yey yey!

An eil martolod: Petra zo 'ta?

Ar martolod kenta: Deuit da weled.

An eil martlod: Ha petra 'ta?

Ar martolod kenta: Digotet 'n-eus eur boupinell.

An eil martolod: Gand ar hast! Deuz peleh 'ma homañ ' tond?

Erwan: Setu. Distaget eo ar fun.

Ar martolod kenta: Ha homañ, euz peleh 'peus distaget 'nezi?

Erwan: Ma sekred eo.

An eil martolod: 'Maoh ket ' vond da lakaad 'hanom da gredi 'peus rastellet 'nezi 'barz foñs ar mor?

Erwan: Hag am-eus.

An eil martolod: C'hwi zo paotr a-walh da farsal, med eun tammig re griz eh it ganti memestra, Gast ar hast!

Ar martolod kenta: Deuz peleh 'ma-hi ' tond?

Erwan: Euz strad ar mor pa laran deoh.

An eil martolod: Euz strad ar mor! A! Sapre farser! Hemañ zo eur spare goapaer. Strad ar mor... A! A! n'eo ket fall. Euz foñs ar mor...

Erwan: Petra a hoarvez ganeoh?

An eil martolod: Toull ma fri, ya! Euz strad ar vatimant ne laran ket.

Ar martolod kenta: Diwallit! 'Ma ar habiten o tond. Ma troio an avel, e vo arnev

Erwan: (*da Zahud o tidui en heol hag en avel*). Ha plijed a ra deoh?

Dahud: E-giz ma vefen o tihuni.

Ar habiten: (*o tond*). Netra torret?

Erwan: N'eus ket.

Ar habiten: Mad. Prest eo an dud. Ale, kuit. (*o weled Dahud*) Piou an diaoul eo homañ? Piou 'n-eus degaset 'nezi war bourz?

Erwan: Me 'n hini eo, Kabiten.

Ar habiten: Tra-walh! Kant kwech tra-walh mod-se! Dreist ar bourz e yay er mor en taol-mañ!

Dahud: Kabiten!

Ar habiten: Larit « Mestr braz ».

Dahud: Mestr braz.

Erwan: Selaouit, Kabiten.

Ar habiten: Erru on skuiz gand hoh istoriou. E bro Moritani eo bet red deom dibarki ho poupinell. E bro-lwerzon on-eus bet kudennou gand an Amiral. An taol diweza 'peus klasket paraforzi eur Spagnolez hag e oem bet dege-meret gand fuzuillou sar kas 'nezi endro d'he bro. Ha homañ neuze, euz peleh 'ma ' tond?

Erwan: Iz...ya... Euz Kêr-lz.

Ar habiten: Oh ober goap 'maoh deuston pe betra?

Erwan: Ne gredit ket! Pa 'z on diskennet, 'm-eus gwelet oam ket stag ouz eur roh, med ouz eur voger bennag. Klasket 'm-eus goud muioh, setu 'm-eus gwelet e oa eur gêr vraz. Souezet e oan er penn kenta ha neuze 'm-eus gwelet tud hag am-eus kôzeet gante.

Ar habiten: Hemañ, ne ha ket mad gantañ 'barz e benn.

Erwan: Gwir eo peogwir laran deoh, ha kôzeet 'm-eus gante. Bez' e oa eur beleg en o zouesk.

Ar habiten: Sur, ne ha ket mad gand ho penn. Selaouit: bet oh bet pelloh 'vidom-ni 'barz 'r skol, med arabad kemer 'hanon sotoh 'vid m'emaon. Hoh istoriou 'm-eus klevet en ho raog, ha bevet 'm-eus a-walh evid goud n'eo ket gwenn ar melen-vi. Med m'emaoh o klask ober 'n azen ganin, eo gwelloc'h lared dioustu. Amzer 'm-eus ket da goll. Degouezet on ouspenn ha skuiz gand hoh istoriou merhed. Kit d'ho mekanikou. Kentiz ma vim war an douar-braz, e kasin 'nezi da baotred al lezenn. Kit kuit euz amañ.

Erwan: (*O tao! e baperou*). Setu ma faperou! Larit on bet beuzet. Kuitaad a rin ar vatimant ganti henez pa vim tost euz an douar braz.

Ar habiten: Med sod oh da staga! Dastumit ho baperou ha kit da labourad.

Erwan: Kabiten, ma kasit 'nezi da baotred al lezenn, ne vo ket lezet da vond kén 'nezi. Na virit ket ouzin mond kuit.

Ar habiten: Ale, harpit d'ober 'n azen ha kit d'ho labour. Gwelet vo war an douar-braz. Ha homañ, prennet an nor warni 'barz ma hambr. Dipituz e vefe lakaad 'nezi endro 'barz strad ar vatimant, memestra!

Erwan: Med, Kabiten, ne oa ket e strad ar vatimant.

Ar habiten: Kit da labourad, 'm-eus laret deoh.

Dahud: Mestr' braz, lezit 'hanon da vale war ar pont, abaoe keid-all 'm-eus ket gwelet an heol.

Ar habiten: Ma, med diwallit 'nezi neuze.

Dahud: (o pellaad) Erwan!

Ar habien: Savit ar chalut, ha d'ar gêr!

(Muzik. *Ar heflusker o vond endro.*)

An eil martolod: Ha petra zoñjit?

Ar martolod kenta: Petra zoñjit euz petra?

An eil martolod: Deuz an dra-ze. Netra.

Ar martolod kenta: N'on ket evid kompren pegiz eo deut 'benn da guza 'nezi heb goud da zen ebed.

An eil martolod: Ya, n'eo ket bet didres ar paotr.

Ar martolod kenta: Ha kredi a rit e istor?

An eil martolod: 'Ran ket 'vad.

Ar martolod kenta: Ha gwelet 'peus he lagad?

An eil martolod: Lagad piou?

Ar martolod kenta: Lagad ar plah.

An eil martolod: Hag am-eus.

Ar martolod kenta: Ha neuze?

An eil martolod: Daonet.

Ar martolod kenta: N'on ket evid kompren pegiz eo deut 'benn da zigoti... 'nezi.

An eil martolod: Goud a oar kêzeal ouz ar merhed: ar varzoniez, c'hwî oar...

Ar martolod kenta: C'hoari a ray troiou kamm dezañ eun devez bennag.

An eil martolod: Eun devez bennag, sur!

Ar martolod kenta: Gisti an diaoul!

An eil martolod: Gisti 'neze, ya.

Ar martolod kenta: Bo! Petra vern evid eur hard eur a blijadur?

An eil martolod: Evid e blijadur.

Ar martolod kenta: Chañs 'n-eus ar gast-paotr-ze memestra.

An eil martolod: Hag e-neus.

Ar martolod kenta: 'Benn warhoaz e vim 'barz ar gêr.

(*Sioulder. Keflusker. Tarzadenou kanolliou.*)

Ar martolod kenta: Petra an diaoul zo oh ober trouz aze?

An eil martolod: Eur yacht, o saludi 'hanom.

Ar martolod kenta: Peseurt banniel?

An eil martolod: Royal Dominion Oil.

Ar martolod kenta: Ober trouz 'vid diskouez 'n-eus glaou.(1)

An eil martolod: Ober a ra zin deom.

Ar martolod kenta: Ha perag ne dennfe ket warnom kement hag ober?

An eil martolod: 'Maint o tiskenn eur vag vihan war vor.

Ar martolod kenta: Evidom 'maint o tonde?

An eil martolod: Tri mil hast! Sellit pegiz 'ma gwisket hemañ! Diwallit sar tostaad outañ.

(*Pignad a ra ar priñs. Lapous-den bro ar Zav-Heol anezañ. Doare meka-
nik da gêzeal. Dond a ra war-wel 'dreñv ar vekanisianed, dre leh ne oent
ket ouz e hortoz. Estonet int.*)

Ar priñs: Ar habiten, mar plij!

An telennour: Amañ 'maon. Petra zo?

Ar priñs: Din d'en em ginnig: Priñs Astar ar Vived Royal Dominion Oil.

Ar habiten: Kabiten Gonideg... hag e vagad.

(1) argant.

Ar priñs: Ober a ran war-dro ar petrol. Eur binvidigez hag eur mad evid ar bed-oll. Lakaad a ra ar hirri-nij hag an otoiou da vond; sklêrjenna a ra an tier hag ar hêriou. Leh ma vez kavet e tired eur mor a dud: klaskerien, labou-rierien, finañserien a beb seurt... Greet e vez deustañ an Aour Du, kar d'ar re o-deus eur banne, e tegas arqant, galloud ha pouez. Setu aze peraq eo ar petrol eun dra vad evid ar bed-oll. Beaji a ran kalz dre vicher ha redeg a ran moriou ar bed, 'zaleg bro-Arabi tre beteg bro an Ostrali, 'zaleg bro-Chin tre beteg bro an Amerik. Ha p'am-eus gwelet ho patimant tuchantig, 'm-eus ket en em viret da zond d'ho kweled.

Ar habiten: (kroz). Trugarez.

Ar priñs: Kalz e plij din ar vartoloded. Estlamm e ven dirag o nerz-kalon, o dispriç rag an dañjer. (1)

Ar habiten: A!

Ar priñs: Setu aze eur ouenn yah ha kreñv. C'hoantaad a ran ar broiou hag a zav paotred egistoh.

Ar habiten: A 'ta!

Ar priñs: Setu aze ar baotred hag a faot d'an deiz a hirio. (Kinnig a ra sigar-riou dezañ). Mar plij ganeoh! Aon 'm-eus ne hellan ket chom gwall-bell ganeoh.

Ar habiten: 'Maon o tistrei d'ar gêr.

(Abaoe eur pozad eo degouezet Dahud 'd'ereñv o tiskoutal).

Ar priñs: Sell 'ta piou! Dahud? Petra an diaoul 'maoh oh ober amañ?

Dahud: Ha c'hwi: petra an diaoul 'maoh oh ober amañ?

Ar priñs: O, dre zegouez. Biskoaz ken bihan ar bed. (O hoarzin). Dond a rit ganin?

Dahud: 'Ran ket, trugarez. (O tiskouez Erwan o paouez digouezoud hag o selled oute).

Ar habiten: Distlabit hi euz amañ m'ho-peus c'hoant.

Ar priñs: (O selled ouz Erwan). Kompren a ran. (O hoarzin). Gwella gour-hemennou. Eur zigarenn 'po? Kontant on evidoh, ma faotr, kontant-tre. Ana-vezed a ran Dahud abaoe pell 'zo. Eur vignonez koz ha fidel. (C'hoarzin a ra). Kared a reoh 'nezi kalz. Afer 'deus beza karet. Afer 'deus karantez, pasion ha fealded. (O hoarzin). Ezomm 'deus da gaoud eur paotr 'gistoh... evid beva. Kompren a rit? (O hoarzin). Ale, eet on. Kenavo. (O hoarzin). D'eur wech all.

(1) ven: vezan.

Dahud: D'eur wech all.

Ar habiten: Beaj vad deoh. (Mond a ra er-mêz).

An eil martolod: (O sacha war e zigarenn). Ma vefe toud ar re binvig mod-se!

Ar martolod kenta: Ne goust ket gwall-ger dezañ.

Erwan: (Hag a oa chomet difiñv). Hennez ne blij ket din tamm ebed.

Dahud: (Pell). Erwan! (Mond a reont er-mêz).

(Muzik. Keflusker. Ar chaluter en noz du.)

Erwan: 'Benn tuchantig e yim 'biou ar beg-douar.

Dahud: An douar.

Erwan: Na chomit ket aze: c'hwi a bako anoued.

Dahud: Anoued? (O hoarzin).

Erwan: Brao eo an noz-mañ.

Dahud: Hag eo.

Erwan: 'Peus ket keuz?

Dahud: Keuz?

Erwan: Geriou 'zo n'oh ket evid kompren. Gweled a rit houlenñ ar mor. Sellit piz outi, misteriu ha dedennuz evelдох. Noused noz 'm-eus tremenet war ar pont-mañ o selled deuste e-giz-se. Hag e klasken en o flegou kuz ma mojennou koz: Ahez, Mari-Vorgan, Dahud. A-wechou memez e kleven eur vouez, eur galv o tond. Ha setu 'maoh em hichenn, o kreniga, Dahud.

Dahud: Dond a ra brao ganeoh 'vid eur martolod.

Erwan: Reded 'm-eus ar skoliou, setu perag moarvad. Huñvreal a reen eun tamm mad re. Gweloh 'm-eus kavet beza martolod. Plijed a ree din muioh ar bed hag ar mor braz.

Dahud: Hag ar merhed?

Erwan: Ha c'hwi dreist-oll. Gand toud ar re 'm-eus 'n em gavet, 'm-eus klasket adkaved na pa ve kén eun elvenn euz ma huñvreoù. Ha setu 'maoh degouezet hag ennoh 'm-eus kavet toud ar re all: ar sklêrjenn oh. 'Barz ma huñvreoù e oah par d'eur steredenn, ganin-me o vond d'ho kaoud, ganeoh-c'hwi o hortoz 'hanon.

Dahud: (*O hoarzin*). Ar barz—martolod!

Erwan: Perag c'hoarzin? An huñvreou o—deus o lod a wirionez... Ha memez ma 'z eo eun huñvre e teu ar faltazi da veza gwirroh evid ar wirionez... Mar doh nemed faltazi ha ma tistroit d'an douar euz leh 'maoh o tond: me 'n em veuzo ganeoh. Piou a ouezo neuze ober an disparti, etre ma horv ha ma spered, etre ar faltazi hag ar gwir, etre an den hag ar c'hwez a zegas buhez dezañ.

Dahud: A! A! A!

Erwan: C'hoarzin a rit 'blamour 'peus ket keuñ.

Dahud: Hag ho—peus—c'hwi?

Erwan: Perag respontit bepred gand eur goulenn all?

Dahud: Ha perag ne rafen ket?

Erwan: C'hoant 'mije goud piou oh.

Dahud: Moyenn vo deoh.

Erwan: Euruz on.

Dahud: (*Goapauz*). Ha c'hwi, 'peus ket keuñ?

Erwan: (*Nebet eun tamm*). Perag 'mefe? Nehet on eun tammig marteze, 'blamour d'an dud on—eus laosket war on lerh du—ze. Ne gav ket din e teuin 'benn da gas 'neze kuit euz ma spered. (*Dahud en em lak da hoarzin*). Med pa zell'an ouzoh, ken tost ouzin, eh a kuit ma nehamant. (*O kemer anezi etre e zioureh*). Gwrez zo en ho korv.

Dahud: (*Bepred o hoarzin*). Evel tan en ivern.

Erwan: En em domma a rin ouzoh beteg devi ma horv a—bez.

Dahud: Ar garantez hag a zev.

Erwan: Hag a ra, Dahud: ar garantez hag a zev hag a ro buhez. Evel an tan, e tev hag e tasoh. Mammenn ar vuhez anezi.

Dahud: Karantez...

Erwan: Karantez da viken.

Dahud: Karantez da viken... Ha kared a rit 'hanon, Erwan?

Erwan: Hag a ran, Dahud.

Dahud: Pegeid e karoh 'hanon?

Erwan: Da viken, Dahud.

Dahud: Neuze e vevin da viken.

Erwan: Ha perag 'ta?

Dahud: Abalamour e vevin keit ha ma karoh 'hanon.

Erwan: Hag a reoh. Beva a reoh da viken ha ma anal a vo hoh—hini. (*O pokad dezi*). Me zo ho korv ha c'hwi ma ene. E—giz garr eur blantenn hag he hrogenn, liammet gand an druni (1) o pignad. Ar horv a—unan gand ar spered o tassoni an eil d'egile en eur vuhez nemeti. Nag an amzer nag ar bellder ne zispartio ano Dahud euz hini Erwan.

Dahud: Beva a rin bremañ.

Erwan: Bremañ zo moyenn mond kuit. Peleh bennag e vefem en em gav—fem endro. N'eo ket braz a—walh an douar evid en em goll. (*Roga a ra e baperou*). Harz 'bed kén, tamm paper 'bed kén, ano 'bed kén, gouenn 'bed kén. Nemed an douar... an douar deom—ni on—daou... an douar dindannom, an douar dindan on zreid... (*Spluja a reont*). (*Dond a ra eur martolod dioustu; kloh an alarm*). Unan bennag er mor! Toud 'n dud war ar pont braz! Unan bennag er mor!...

Ar habiten: Erwan?

Eur martolod: Ya.

Ar habiten: Laret 'm—oa deoh chom en e gichenn. Ha peleh 'ma ar plah?

Eur martolod: Gantañ 'ma eet.

Ar habiten: Sod eo.

Eur martolod: O neuia 'maint 'trezeg an douar.

Ar habiten: Diskennit ar vag vihan.

Eur martolod: 'Dalv ket ar boan: ne zistroio ket.

Ar habiten: Erwan! Deuit endro! Erwan! Erwan! Sod oh! Distroit amañ, n'it ket gand ar vaouez—se!

Eur martolod: Ne zistroio ket.

Ar habiten: (*O selled ouz e baperou roget*). Diskennit ar banniel.

(*Muzik. Du al leurenn*).

(1) druni: seo.

TREDE ARVEST

(Ar gêr vraz. Dindan bolz ar metro en neh, dindan an amzer. War ar piler ez eus skritellou braz gand « Dahud Star ». Er foñs: « Dahud » skrivet gand lizerennou goulou. E-tal eur peul-lamp ez eus eun den o hortoz: Erwan eo. Paotr gwisket mod-kêr 'vel ar re all. Dond a ra ar muzik war al leurenn dre ma vez digoret an nor. Klevet e vez o kana.)

**Ma halon a zo 'giz eur gêr
gouarnet gand eur prizoner
'giz eur gêr eo ma halon
piou zieubo ahanom?**

**Den ne zigoro an nor
Nobody will open the door
Personne n'ouvrira la porte.**

**Al liamm on staget gantañ
a garantez hag a wad
n'eo nemed eun diskan
a blij d'ar galanted.
Me gar 'noh, c'hwi gar 'non.
-Karantez da viken
distronk eo tarz an deiz
ha setu erru an deiz.**

**My heart is like a town
guarded by a prisoner
my heart is like a town
who will release us?**

**Den ne zigoro an nor
Nobody will open the door
Personne n'ouvrira la porte.**

Serret eo bet an nor
serret dor ma halon
kalon ar gêr varo
ar gêr a walleur
an alhwez a zo kollet
ha gand an avel merglet
koueza ra euz an nêv
daerou ar galanted.

Mon coeur est une ville
que garde un prisonnier
mon coeur est une ville
qui peut nous délivrer.

Moueziou en deñvalijenn: Sigaret... foto... sigaret... Goulennit ar gazetenn ispisial: Dahud 'barz ar vro. (*Just dirag ar piler ez eus eur hlasker—bara o hoari 421*).

Ar hlasker—bara: 4... 2... 1... pevar hant unan warn—ugent! (*mouez off*) Kazetenn ispisial. Ar wirionez penn—da—benn diwar—benn « Dahud », ar ganerez nemeti! Dahud, oskar al loen brava er bed! (*Muzik; kan*). Sigaret... foto... sigaret...

Pevar... daou... unan... pevar hant unan warn—ugent!

Eur vouez: Goulennit ar gazetenn ispisial. Ar heleier diweza. Kudennou 'barz broiou ar petrol goude pasaj Dahud. Kôz zo 'ma ar broiou all da lakaad o tri e—barz! Adkregi ray an abadenn 'benn eur hard eur ahann! (*Kan off*).

Erwan: A—benn ar fin! (*Oh ober eur paz pe zaou*).

Ar hlasker—bara: Tra la la. (*D'an arvestourien*). Sod eo gand ar muzik. Di—baoe pevar devez e teu amañ beb noz. Abaoe vez homañ... (*Muzik, kan, Kloza a ra an nor adarre*). Tra la la. (*Taal a ra an diñsou*). Pevar... daou... unan... pevar hant unan warn—ugent!

Eur vouez: Ar heleier diweza... Kazetenn ispisial... An abadenn 'zo 'vond da gregi endro... Sigaret!... foto!... sigaret!... (*Trouz oto paotred—an—tan*).

Ar hlasker—bara: Harz d'an tan... Tan! Tan! tan, tan, tan! dir ha dir!... (*O hoar—zin*).

Moueziou: Sigaret... foto... sigaret...

Ar hlasker—bara: Marteze 'pefe unan... dre zegouez.

Erwan: Am—mefe petra?

Ar hlasker—bara: Eur zigaretenn.

Erwan: Delit!

Ar hlasker—bara: Trugarez. (*Butuni a ra*). (*Sonerez*). Ponner eo an amzer, ket 'ta?

Erwan: Hag eo.

Ar hlasker—bara: Feson arvev.

Eur vouez: Meine Damen und Herren, Ladies and Gentlemen, Aotrounez hag Intronezed, setu an abadenn ziweza. Abadenn ziweza! (*Kan*). Sigaret! Foto! Sigaret!

Ar hlasker—bara: Ha petra ne rafeh ket evid kaoud argant? Ha c'hoaz ma teurent a—benn da gaoud! Med ne deuont ket. Diouz o fennou e weleh dioustu: treud o diouchod, eskerneg o diskoaz, skuiz o daoulagad evel re chas re wan da bega. Ha koulskoude ma hellfeh gweled ar re all; paotred an argant, dirampeg, lard, o hov leun a gaviar. 'Fin, laret 'm—eus deze: eun devez vo chañchet penn d'ar vaz, med ne gredont ket. Lakaet ven sod gante. Koulskoude ' welan sklêr. Sklêr an traou em spered kement hag em halon. Ar filozofer vez greet deuston. Sklêr eo an amzer da zond evidon. Chañchet e vo penn d'ar vaz. Pevar... daou... unan... pevar hant warn—ugent! (*Muzik; kan*). Kleveland a rit? Plijadur a zo! A! A! A! Evet vez; butunet vez. Kemeret vez drogaj, en eur frota an eil egile hag an eil eben; orgiez gwasoh 'vid moh. An devez all eo deuet 'mêz eur paotr pinvig, mezo dail, glaz da darza. Peder, e oant d'e heul hag oh en em lipad e mantilli feur. Hag eñ o jeti hag o tison—ka hed—ha—hed, tra—walh da lakaad 'hanon da ziloja 'blamour d'ar c'hwez fall. Evet vez gwin ha staotet dour, 'vid lakaad an amzer da dremen... Pevar... daou... unan... Pevar hant warn—ugent! (*Muzik; kan*).

N'oh ket intereset gand 'r pez a gontan? Rezon 'peus. Kemerit ar gwella euz ar vuhez ha dreist—oll na labourit ket. Labourad hiro an deiz a zo en em brostitui; laret 'm—eus deze. Tamm anarkour brein! Me anarchist! A—viskoaz on bet evid an Urz: an Urz en diabarz hag amañ, penn ha kalon. Neuze on bet lakeet sod gante eur wech ouspenn. Esoh eo 'vite. Ha me, c'hwi oar, ne hellan ket derhel eur bramm, genaoueg ma 'z on. Ne larit netra, c'hwi! Rezon 'peus... Chit! Tavit! Pevar... daou... unan... Pevar hant unan warn—ugent!

Erwan: Larit din: c'hwi oa 'barz du—ze, oah ket?

Ar hlasker—bara: Chitit! Tavit!

Erwan: Du—ze eah, oah ket?

Ar hlasker—bara: Brama a—dreuz 'm—eus ket c'hoant. Lakeet 'm—eus ma zeed 'barz ma botez.

Erwan: Du-ze oah ivez. Dond a ra soñj din bremañ. Larit oah 'barz du-ze ivez. Respontit 'ta ma n'oh ket sod-mik. (O hejal anezañ). Eur respont 'mo pe 'mo ket?

Ar hlasker-bara: Ma chom mud an den fur, pegiz lared eo fur. Marteze 'ma sod. Med ma chom mud an den zod, pegiz lared eo sod? Marteze 'ma fur. Setu etre an den fur hag an den zod, pegiz ober an dibab, kar ma cho-mont mud o-daou e chom ar rezon gante o-daou ivez. Chit! Tavit! Chit!... (O tiroll da hoarzin).

Erwan: Soñj 'peus 'hanon, hañ? Sur oan 'poa dalhet soñj deuston. Larit din: da beleh 'ma eet an oll re a oa o hortoz 'hanon du-ze? Hag-eñ o-deus soñj ahanon? N'eus devez ebed a basev heb ma kredan gweled unan bennag aneze 'barz kêr. Ha pa dostaan deustañ e ra van nompaz anavezad 'hanon. Med c'hwi oa du-ze ivez. A-benn ar fin! Ober ra vad d'an den. Ar pez 'poa laret din a zo c'hoarvezet. Eet eo hi kuit. Med tapa 'rin 'nezi hag e kasin 'nezi endro beteg Kêr-lz. Ha c'hwi a gonto deze toud. Toud, penn-da-benn: kaoud soñj.

Ar hlasker-bara: Hag a rin, ya... Hag a rin... 'Gomprenan mann 'bed. Sod eo hemañ pe betra?

Erwan: C'hwi gonto deze e ouieh en a-raog. C'hwi gonto deze pas boud droug ganin. Ne oan ket evid ober mod all. Ne oan ket evid en em vired. Sorsset oan bet ganti, kompren a rit? Koulskoude oa bet laret mad din 'm-ije redet ar bed war he lerh.

Ar hlasker-bara: (Oh ober van kompren) A 'ta!

Erwan: Kas a ray 'hanon sod-ti. (1)

Ar hlasker-bara: A 'ta!

Erwan: C'hweza a ray an tan en douar.

Ar hlasker-bara: Hag a ray?

Erwan: Ne ray ket 'vad! Me a viro deusti gober. Tuchantig e paseo. An istor-ze ne hall ket komañs endro. Bremaig e tapin 'nezi endro pa baseo. Goud a oar ne hall ket beva hebdon. Hag he galant a oar ivez. Dond a ray davedon endro a-hend-all... (O tiskoacha eur bistolenn); (O huchal). Ne hwezo ket an tan-gwall... en douar a-bez. (O selled ouz ar hlasker-bara truezuz).

Digarezit 'hanon; pariet 'mije... maleuruz on. (Ar hlasker-bara a ha er-mêz d'an daoulamm gand an aon). Ha lakeet e vefen da zod gand hemañ ivez! (Antreal a ra eur paotr bihan gand eun harmonika ha kelaouennou da werza; harpa a ra, selled a ra ouz ar skritell, c'hoari a ra eur pozad gand e venveg, selled a ra endro en eur hoarzin). Dahud!

(1) sod-nay.

Erwan: (D'ar paotr). C'hwi oar piou eo?

Ar paotr: Hag a ran. Dahud 'n hini eo. Ma breur 'n-eus eur gartenn-bost 'giz honnez 'barz ar gêr.

Erwan: Eur breur 'peus 'ta?

Ar paotr: Ya, hag unan braz. Pa vin braz e vin 'gistañ.

Erwan: Ha petra ra ho preur?

Ar paotr: Netra. Rei taoliou boutou d'an dud.

Erwan: Perag 'ta? Droug eo eñ?

Ar paotr: A-wechou memestra. Eur wech 'm-oa laeret e « Zahud » ... 'vid ober koleksion. (Eur pozad). Gand pemp zo moyenn deoh kaoud eun da-bietenn chokola. (Mond a ra er-mêz sar hoari). (Digori a ra dor ar habaret. En em lakaad a ra Erwan en deñvalijenn. C'hoarz Dahud. Moueziou dis-heñvel paotred a beb tro.)

Moueziou: Dahud, je vous aime, I love you, Ich liebe dich...

Erwan: Me a gar 'hanoh ivez, Dahud.

Erwan: Me a gar 'hanoh ivez, Dahud.

Moueziou: Au revoir, bye!... (Dond a ra Dahud tre. Eur vroz cheuh ganti. Chom a ra ar priñs a-gostez, en deñvalijenn tre beteg fin an diviz-mañ. Harpa a ra Dahud. Diraki-ema Erwan).

Erwan: Ne oah ket o hortoz ahanon. (Eur pozad). Abaoe pevar miz 'zo 'maon 'klask war ho lerh, evel eur hi da heul e vestr. Perag oh eet kuit?

Dahud: Perag 'teuit war ma lerh?

Erwan: Evid ober 'giz ar re all.

Dahud: Petra vern? Unan muioh, unan nebeutoh?

Erwan: Evel just, n'on ket par d'ar briñsed ha d'an dudjentiled.

Dahud: Nann, n'oh ket 'vad! Sellit ouzoh eun tammig.

Erwan: 'M-eus ket c'hoant beza euz ar bed-ze. 'M-eus ket c'hoant beza mesket gand al lorgnez-se.

Dahud: Ar c'hwez a zo tra-walh d'ho koutanti.

Erwan: Larit 'ta c'hoaz!

Dahud: C'hwi gav deoh 'm-eus ket remerket 'hanoh ' spial 'hanon e toull dor ar hestell hag ar staliou. Paour-kêz den! Perag oh deuet beteg amañ?

Erwan: Deuet on da gerhad 'hanoh. Din-me oh, Dahud.

Dahud: N'on da zen ebed.

Erwan: N'oh da zen ebed, med c'hwi en em ro da doud an dud.

Dahud: Neuze on deoh ivez.

Erwan: Me, n'on ket da doud an dud.

Dahud: Ha piou oh 'ta, neuze?

Erwan: Erwan.

Dahud: Erwan?

Erwan: Ne zegas netra d'ho soñj, an ano-ze? Erwan? An hini zod diskennet eun devez beteg strad ar mor.

Dahud: Beteg strad ar mor?

Erwan: Na glaskit ket lakaad 'hanon da gredi 'm-eus huñvreet. (*Dahud a ziroll da hoarzin*). Deuet oh a-benn deuston, n'oh ket? An ano-ze ne zegas netra d'ho soñj. Kant kwech gwelloc'h e vije bet din lezel 'hanoh gand ar re all pa faote deze taol 'hanoh 'mêz euz Kêr-Iz.

Dahud: Erwan.

Erwan: Na zistagit ket an ano-ze kên: 'm-eus ket c'hoant e vije louzet war ho muzelloù. 'M-eus ket c'hoant e vije kemmesket ma ano gand re ar galan-ted o-deus ruillet 'barz ho kwele.

Dahud: Marh-koah!

Dahud: Marh-koah!

Erwan: Na zellit ket ouzin!

Dahud: Beo eo c'hoaz ho karantez, Erwan?

Erwan: Kristen ebed 'n-eus karet 'hanoh 'giz 'm-eus-me greet. Goud a rit mad-tre. Afer 'peus deuston 'vid beva. Hebdon ne vefeh mann 'bed. Netra. Ma hellfe ho kalon harpa da lammad, gand joa eo e welfen 'hanoh mond e-biou man daoulagad da viken. (*O tapoud krog enni*). Kar mond a rafeh da netra ma teufen 'benn da nompaz kared 'hanoh kên. Distrei a rafeh d'ho pro villiget 'vel an diaoul d'an ivern, (*o huchal*) da Gêr-Iz!

Dahud: Pegiz rafeh evid beva heb ho soñjou?

Erwan: Perag e tehit kuit dirazon?

Dahud: Amañ 'maon. 'Maon ket?

Erwan: Pas c'hwi: eben. Dahud gwechall. Ha soñj 'peus ahanom-ni on-daou o pignad war bourz ar vatimant... ma huñvre ganin, ha me, o starda 'nezañ etre ma divreh... eun huñvre zod.

Dahud: Kit da heul hoh huñvre ha me a yay gand ma hent pelloh. Heb kenavo. Mond a ran da gousked.

Erwan: Kousked... ne ran ket kên. Leun e vez an noz gand lagadou o spial 'hanon. Eur galv eo peb mouez. Tremen a ran ma zammig amzer o klask tizoud 'hanoh ha pa gredan on deuf a-benn, e krog ar gwall-huñvre endro. Pellaad a rit ouzin... Soñj 'peus, ho korv a drouze 'giz eur frouezenn azo 'mêz euz he hrogenn re vihan. Med c'hwi zo chomet kên misteriu a-viskoaz.

Dahud: (*lirik*) Me zo ho korv ha c'hwi ma ene. Peleh bennag e yafem, en em gavfem endro, re vihan eo an douar evidom-ni d'en em goll. Ha soñj 'peus?

Erwan: Geriou 'metken, pozou 'metken.

Dahud: Mond a rin d'ho heul 'giz ma ya ar skeud da heul ar horv... (*Goapauz*). Soñj 'peus?

Erwan: Mond a rin d'ho heul, hag e tiverkin roudou ho treid gand ma anal. En em ruza a rin ma vez dao, e-giz eun naer, 'giz eur velhwedenn, 'giz eur vuzugenn zoken.

Dahud: Den pe loen-ruz e vefeh? 'Peus ket mez! Savit 'ta!

Erwan: Pegen disprizuz oh! Roet 'm-eus toud ar pezh 'm-oa deoh. N'am-eus bevet nemed 'vidoh. Sellit e peseurt stad 'peus lakeet Erwan. Eur spontail brini e-kreiz an avel, eur zahad eskern o haloupad war-lerh e skeud... Tuchantig e tegouezo ar billaouerien da gerhad 'neze d'ober pempigou gante evid ar re zod: unan... daou... tri... pevar... ha hopala! A! A! A! (*Eur mell c'hoarz. Dahud en em lak da hoarzin ivez*). C'hoarzin a rit. (*O kêzeal d'e skeud*). Petra? Dalhmad war ma lerh. Kit kuit 'ta! Kit kuit, skeud Dahud! Kit e-biou ma daoulagad. En em zistaga a reoh euz ma zreid pe reoh ket? Kuit, 'm-eus laret deoh... Petra? C'hoant 'peus en em astennfen warnoh? Pas! Pas kant kwech! Tehit kuit beteg teñvalijenn an henchou dall. Tehit kuit euz fas an douar. (*Disklabeza a ra an douar gand e zaouarn*). Kit 'biou man daoulagad. A! tapet 'm-eus 'hanoh 'benn ar fin!

Dahud: (*O tamouela hag o tamhoarzin war ar memez tro*). A!... aha!...

Erwan: Amañ 'ma bepred, hag aze. O! Peseurt c'hoarz! (*Dahud o ouela*). Pell diouzin ar c'hoarz-se. Pell diouzin ar vizai-ze. Pell, 'm-eus laret. (*Dam-*

skourr a ra ouz ar piler). Doue da gaoud truez! Lakit eur mouch war ar vizaj-ze! Kit da zotal, bizaj dizneuz! (*Hejal a ra ar peul-lamp*). O! Heol! Diskouezit din tu a-dreñv ar stered, pe neuze dallit ahanon gand ho sklêrijenn. Oabl, bouzarit 'hanon gand hoh arnev. Grit ma ne glevin ket kèn ar c'hoarz-se. Grit ma vin dall, bouzar, med ma-eun-penn. O! Heol! harpit da droi... Disheol, mar plij, disheol. D'ar skeud ha d'an disheol d'en em unani en deñvalijenn! (*Trouz an arnev; luhedenn; koueza a ra Erwan. Gand eur helh goulou e tegouez ar priñs.*)

Ar priñs: Piou 'n-eus galvet 'hanon? Piou 'n-eus preget euz an deñvalijenn? (*Trouz an arnev adarre, luhedenn ha goulou endro.*) Dahud kêz! Diwezad on eun tamm, darling. Feson arnev zo. Deom kuit ahann. (*Kendalh a ra an arnev hag al luhed eur pozad beteg mervel a-bell e fin an arvest. Dond a ra tre ar paotr bihan hag ar hlasker-bara.*)

Ar hlasker-bara: Hastit buan, paotrig. Amañ vim en disklaou. Tamm arnev brein. Eur strakadenn hag amzer 'walh deoh da zastum ho rikou.

Ar paotr: 'Ma 'r glao o tond.

Ar hlasker-bara: Hag ema, paotrig! O vond da staota 'ma mamm an diaoul. Ale, deuit da gluha amañ hag a halloh kousked sioul ha dirohal ma ne vloh ket ampechet gand an arnev.

Ar paotr: Sellit. Du-ze zo unan ' kousked ivez.

Ar hlasker-bara: An hini zod tuchantig! Diwallit, 'wechou vez droug. Hep-hep! Dihunit 'ta! 'Ma 'r glao ' tond. Gletet e vloh.

Erwan: (*Sod e benn gantañ o weled skeudenn Dahud*). Maouez villiget ha karet beb eil tro. Perag e teuit endro da dourmanti ma halon. Treh eo bet ho sklêrijenn griz war liñsel ma zeñvalijenn... Ne larit mann 'bed. Lezit ho c'hoarz laouennaad ma daoulagad, melezour ma 'z eo deuz ene ma muia-karet... Ne larit mann 'bed. Dalhit ho teod gand aon ma teufe ar gomz disterra da gas ar grouadurez vresk-se da netra.

Ar paotr: C'hwi gompren 'r pezh a lar, c'hwi?

Ar hlasker-bara: 'Ran ket. Rit ket bil: sod eo.

Erwan: Aze 'maoh endro a-benn ar fin. Ma teufen 'benn da gontañpli 'hanoh e-giz-se da viken...

Ar hlasker-bara: Deuit d'an disklaou, 'm-eus laret deoh. N'a ket mad ga-neom! Ober a ra glao bremañ.

Erwan: Tud vad oh, ma mignoned. Glaoi a ra ar houmoul war ar gêr vraz. Gouela a ra an oabl war on fehejou.

Ar hlasker-bara: Me 'ya, me 'ya, ma mabig Jezuz! Trouzal a ra an arnev, hag ema dao dond d'an disklaou. C'hwi wel: gleba a ra dija. Paka a reoh eur sifern, ha se n'eo ket mad evid ar penn. Ale, kouskit aze. Gwiskit ma mantell. Kouskit. Terzienn 'peus.

Ar paotr: Ne respont ket; kouskoude 'ma digor gantañ e zaoulagad...

Ar hlasker-bara: Den ne oar ar pezh 'basev 'barz e benn. Libr eo.

Ar paotr: Libr? O huñvreal 'ma.

Ar hlasker-bara: M'ema o huñvreal ema libr. Den 'bed ne halfe ampech 'nezañ da huñvreal, na pa vefe 'dreñv prenestrou striz eur prizon... Amzer louz. Noz vad deoh!

Ar paotr: Noz vad deoh ivez. (*O kousked. Trouz ar glao. Muzik.*)

Erwan: O ouela 'maoh, Dahud, o ouela war ar gêr vraz. (*Dond a ra ar priñs ha Dahud war-wel a beb tu al leurenn, o vond an eil daved egile.*)

Ar priñs: Gouela a rit, Dahud... Kouskoude 'm-oa dizehet deoh ho kalon e-giz mein an dezerz.

Dahud: Gouela a ran, gwir eo. Dizesper Erwan a ra din gouela.

Ar priñs: Treitourez. (*Stlaka a ra e hloanenn evel eur foet.*)

Dahud: Truez! Kaoud truez!

Ar priñs: Truez ebed evidoh!

Dahud: Doue-da-gaoud-Truez! (*O pega e-barz penn all ar hloanenn.*)

Ar priñs: Truez ebed, 'laran deoh! (*O sacha e kouez Dahud; c'hoari a ra stleja anezi.*) Ruzit! Ruzit, gast femelenn ha larit deom piou oh bremañ.

Dahud: Eul loen on, eul loen-ruz, eul loen gouez; unan hag a yud, unan hag a we. Loen ar Maro on.

Ar priñs: (*Kentiz e krog ar muzik*). Dañsal neuze! (*O rei aliou tra ma tañs.*) Uhel ho penn! souplouh mar plij! buannoh! Troad a-raog, daou a-dreñv! Ale, fichit eun tammig! Gwelloh-gwella!

Dahud:

'Barz ma hreiz ema man droug.
'Barz ma hreiz, eun ibil seiz penn.
'barz ma hreiz e furch hag e sko.
'Barz ma hreiz ema ma mestr.

Ar priñs: Ha piou eo ho mestr?

Dahud: Mestr an tan, Mestr an deñvalijenn. (O vond d'en em daol etre e zioureh evel boemet gantañ.)

Ar priñs: Ha dañsit bremañ, femelenn! (En em lakaad a ra da zañsal gand ar priñs.)

Dahud: (O kana.)

Ganin-me eun ibil seiz penn;
ganin-me eun dragon lagad-tan;
ganin-me eun drênenn seiz pik;
ganin-me 'l lagad touseg, eur vi sarpant.

Ar priñs:

Dañsit koroll an huñvreou
Ha kontit 'nehe unan hag unan,
'zaleg ar fin d'ar homañsamant.

Dahud:

Teñvalijenn nemeti war an douar
Teñvalijenn nemeti.
An anken ganet ag ar maro.
Mann 'bed a-raog, mann 'bed war-lerh.
Netra. Teñvalijenn. Mann.
An dizesper.
Mogeriou braz tro-dro d'ar gêr
Mor braz tro-dro d'ar voger.
'Mogeriou braz tro da gant tour,
'Kant tour o lipad an oabl.
'giz teodou mein,
'david an oabl. »
Eur plah a oa 'barz kêr
O kriba he bleo melen aour
'gand kribenn Marzin.
'Marzin, ha gweled a rit sklêr?
'ha gweled a rit sklêr en amzer da zond?
'An da-zond am-eus-me kollet,
'Eet eo gand al laer,
'Eet eo gand eur bugel glan,
'Lazet 'deus ar bugel war eun daol,
'War eun daol vein e red ar gwad
'Didan an daol ez eus eun dragon
'O lipad ar gwad ruz o tivera. »
Eun dragon ruz o tihun en he halon,
Eun dragon ruz war eur marh tan:
O tegouez emma ma friñs endro;
Kleved 'ran 'nehañ o skei e toull an nor,
O skei e toull dor Kêr-lz.

Marzin! Marzin! Peleh emma an alhwez?
gand ho tad emma,
gand ho tad hag ho roue. (Eur pozad)

« O kousked oe ar roue koz an devez-se,
« O kousked mod eur bugel,
« e benn stouet gantañ 'vel o selaou e galon.
War e galon alhwez Kêr-lz o lugerni,
Alhwez ar skluziou, alhwez ar vuhez
a zo bet laeret ganin-me
hag ar skluziou digoret ganin-me.
Trouz an arnev, kurun ha gwad,
gwad ha dir, dir ha tan.
« Euz 'dreñv an nor e teu an dragon,
« luhed en e zaoulagad,
« o vounta an nor gand e vruched
« e teu tre hag e richan.
« Euz seiz beg braz digor
« e tisonk ar mor
« uheloh-uhella. »
Digoret eo ar skluziou.
Skeud ar priñs en em astenn war Gêr-lz,
War Gêr-lz en em astenn skeud ar Maro
Gand e hoarz e tiskar ar mogeriou,
Da netra e ya ar mogeriou,
Da netra e ya an touriou,
Diwar glev o hleier.
« Kant kleze en em dorr,
« en em dorr 'giz gwer,
« en em dorr 'giz ar mor ouz ar reier,
« o rejeti rest ar peñse,
« o walhi an taoliou mên.

...
War gein e varh emma ar Roue,
war gein e varh du a dreuz ar mor gouez.
Ha me gantañ 'skourr ouz e voue.
drip drep, drip drep?
Dalhmad 'n dragon war ma lerh.
drap drep, drap drep,
Dispega ne rin ket,
dispega ne rin ket!

Lipet gand ar mor ma zreid,
paket gand ar mor ma zreid,
An dragon war ma lerh epred.

...
ha setu-me paket.
Gwenn an heol, du al leh.
Netra kên
Mann ebed war-raog, mann ebed war-lerh.

Eur mestr nemetañ er bed,
ha netra kén, mann! (*O koueza war al leurenn*).

Ar priñs: Deuit davedon. Deuit daved ho mestr. Ha setu Dahud an devez kenta: plah doujuz ha karantezuz da heul. Savit ha deuit d'am heul.

Erwan: (*O huchal*). Na lakit ket ho paoui war ar vaouez—se!

Ar priñs: Savit, Dahud! Kit! deuit! troit! dañsit, c'hoarzit! (*Doujuz evel eur manekin*).

Erwan: Laoskit ar vaouez—se da vond.

Ar priñs: Peseurt maouez?

Ar hlasker—bara: (*O tihun*). Peseurt maouez 'ta?

Ar paotr: Gweled ' ra eur vaouez, sañset.

Ar hlasker—bara: Hopala! (*En em lakaad a ra da gousked endro*).

Erwan: Deuit ganin, deuit d'am heul endro.

Dahud: Da beleh?

Erwan: Pell, da n'eus forz p'leh. D'am bro.

Dahud: 'Peus bro 'bed kén.

Erwan: Ober a rin unan hag a vo deoh.

Dahud: Ar bed a—bez a zo din; din peb korn euz an douar. Meulet eo ma ano war vuzellou an oll.

Erwan: Komzou divlaz ha koz; komzou goular.

Dahud: Komzou beo, o tond euz a bell amzer; komzou nevez evid ar re a oar o zelaou.

Erwan: Komzou maro.

Dahud: Komzou beo 'vid ar re a gred kredi.

Erwan: (*O huchal*). Med kared ran 'hanoh, boulhurun!

Dahud: Me a gar 'hanoh ivez.

Erwan: Gand ma ne garfeh nemedon—me.

Dahud: Gand ma ne garfeh nemedon—me ivez.

Erwan: Ar memez litani adarre!

Dahud: Adarre...

Erwan: Bepred didalvez.

Dahud: Bepred.

Erwan: Perag 'deus ar geriou kollet o blaz?

Dahud: Perag 'deus an dud kollet o fenn?

Mouez ar priñs: (*Diouz an diavêz*), Dahud!

Dahud: Red eo din mond.

Erwan: N'it ket kuit. Chomit ganin hag e vloh an Dahud a—wechall endro.

Dahud: Cheñch a rafen ar bed evid ma teufeh 'gistañ. (*C'hoarz berr ar priñs*)

Dahud: Gevier zo etrezom, beteg re. (*Mond a ra er—mêz*).

Erwan: Laha a rin ar gevier. Laha a rin kement tra. Dahud! (*O tenna gand e bistolenn daveti*). (*Digreski a ra ar goulou tra ma klevet taoliou c'hwitell ar polis*).

Ar hlasker—bara: Bugale Mari Robin! Tehom kuit euz amañ. C'hwez fall zo...

Erwan: (*O kendelher da denna*). Laha a rin toud, toud—toud—toud—toud!

Mouez Dahud: Keit ha ma karoh 'hanon, e chomin beo c'hoaz, Erwan. Keit ha ma karoh 'hanon. (*Taoliou c'hwitell o tostaad, skeudou ar baotred vrag. Teñvaljenn; muzik*).

(*Tribunal. Eul leurennig uhel—uhel, ma kouez ar vouez diwarni. War—zao ema Erwan, e gein war—du an dud. Tra ma komz e klevet muzik, heñvel ouz trouz eur momeder, asamblez gand taoliou gong.*)

Ar vouez: Répondez. Vous avez été trouvé seul dans la rue à deux heures du matin, affalé sur la chaussée. La police, accourue au bruit des détonations, a trouvé à vos côtés un pistolet, le chargeur vide. Qui a tiré et pourquoi? (*Taol gong*).

Vous n'aviez sur vous aucun papier pouvant nous renseigner sur votre identité. Or tout homme qui ne porte pas sur lui son nom et ses empreintes avec le cachet de l'autorité est suspect à la société. (*Taol gong*).

Arrêté, vous avez refusé de répondre à toutes nos questions, refusant

même de dévoiler votre nom et votre nationalité. (*Taol gong*).
Examiné par nos médecins, vous avez été reconnu sain de corps et d'esprit.
En conséquence, la société vous déclare suspect et vous refoule au-delà
des frontières de ses Etats. (*Taol gong*).

(*Teñvalijenn. Muzik*).

PEMVED ARVEST

(*Strad ar vag. O kousked ema Erwan en e hamak. Dindannañ ema paotr
ar radio o lenn e gazetenn. Kleved a reer ton Dahud war an akordeoñs.
Trouz ar mekanikou. Kosaez 'n-eus Erwan eun tamm mad.*)

Erwan: Serret e vo e houg da hennez, pe ne vo ket? Peseurt muzik!

Paotr ar radio: (*O rei dezañ ar gazetenn*). Delit. Setu eun dra bennag
evidoh.

Erwan: Petra eo?

Paotr ar radio: An divroad taolet 'mêz euz Buenos-Aires o tistrei d'an Europ.

Erwan: (*O stlepel ar gazetenn*). Da gahad 'nehe toud!

Paotr ar radio: Eun dra zo: n'eo ket brao beza sitoyan ar bed.

Erwan: Gwir eo, n'eo ket brao din.

Paotr ar radio: Sitoyan ar bed ha tachenn douar 'bed da lakaad ho treid!
Ganet oh bet en eun tu bennag kotliskdoude!

Erwan: Hag on bet, ya.

Paotr ar radio: Perañ ne larit ket e peleh, neuze. **Ni** a gasfe 'hanoh beteg
du-ze. Anavezet e vefeh gand an dud. Kaved a rafeh hoh ano endro hag
eun dachenn douar 'pefe da lakaad ho treid.

Erwan: Rosta a rafe an douar didan ma zreid. Ouspenn-ze: ne blij ket d'an
dud an tasmantou.

Paotr ar radio: Pebez buhez... (*Trouz mekanikou, trouz tud vezo*). Klevet 'peus? Sapre bag homañ! A—wechou e teu aon din. Pas c'hwij? Gwelet 'peus ar habiten?

Erwan: 'M—eus ket.

Paotr ar radio: Tenna a ra d'eur martolod 'giz ma ran—me d'eur marchigod. Hag an ebatou hag a vez gante 'barz an neh aze... Ne zell ket ouzin, goud a ran, pèet e ven 'vid gober al labour ha setu... An noz paseet 'm—eus huñvreet oa eur vaouez vezo o terhel ar stur. C'hoarzin a ree 'giz eur follez... ha setu ar vag war ar garreg. Ha me dihun. 'M—eus ket adkavet ma housk war—lerh.

Erwan: Ma!

Paotr ar radio: Ha kredi a rit en huñvreoù, c'hwij?

Erwan: Ne ouezan ket... ar hoad zo koad, an dir zo dir... Klask a ran goud piou on.

Paotr ar radio: Me 'm—eus greet ma zoñj: d'ar henta porz e tibarkin, 'm—eus ket c'hoant echui e strad ar mor.

Erwan: Me zo bet beteg strad ar mor... Ha gwelet 'peus ar vaouez—se?

Paotr ar radio: Peseurt maouez?

Erwan: Hini ar vag, hini ho huñvre.

Paotr ar radio: N'on ket evid kompren 'hanoh. Kôzeal ' ran deoh euz debri, eva, dond 'mêz euz an toull—mañ evid beva ha ne gomprenit mann 'bed... Kôzeal a ran euz huñvre hag e kemerit an hent treuz. Dihunit 'ta!

Erwan: N'oh ket evid kompren ar pez a zo e don ma halon... (*Akordeoñs*). Serrit e houg da hennez 'ta!

Paotr ar radio: Ne blij ket deoh ar muzik?

Erwan: Ar muzik, eo. An ton ne blij ket din.

Paotr ar radio: Degas a ra traou d'ho soñj?

Erwan: Hag a ra, siwaz. (*Paotr an akordeoñs o tond tre, ser dañsal, eur pakad journaliou gantañ.*)

Ma halon a zo 'giz eur gêr gouarnet gand eur prizoner, 'giz eur gêr eo ma halon, piou zieubo ahanom?

Den ne zigoro an nor,
Nobody will open the door.
Personne n'ouvrira la porte.

Paotr ar radio: Chetu degouezet an hini brao! (*Paotr an akordeoñs o dañsal tro—dro d'an hamak hag o koueza 'benn ar fin.*)

Serret eo bet an nor
serret dor ma halon.
Kalon ar gêr varo
Ar gêr a walleur
An alhwez a zo kollet
ha gand an avel merglet
koueza ra euz an neñv
daerou ar galanted.

Paotr ar radio: Ha setu kouezet ar galon gantañ war al leur.

Paotr e akordeoñs: En ivern 'maon amañ. An ivern didan an douar, didan an dour e strad ar vag. Bepred e vezom 'barz strad ar vag: nemed glaou—dour, tan glaou, glaou an ivern... (*Oh en em lakaad a ra da ouela.*)

Paotr ar radio: Gast, da hemañ n'a ket pikol ar vicher!

Paotr e akordeoñs: Gwir eo n'a ket pikol din: n'on ket bet ganet 'vid beva 'barz bouzellou eur vag. Ganet on bet da veva war an douar e—tousez an dud, e—tousez ar bleunioù...

Serret eo bet an nor,
serret dor ma halon,
kalon ar gêr varo,
ar gêr a walleur;
an alhwez a zo kollet,
ha gand an avel merglet;
koueza ra euz an neñv,
daerou ar galanted.

Erwan: Peoh 'ta!

Paotr e akordeoñs: Mad, ne larin mann 'bed deoh kén. C'hwij, n'oh ket 'vid kompren: 'peus bro 'bed kén. Med, me 'm—eus c'hoant beva. Ouspenn ha skuiz on degouezet; c'hoant 'm—eus mond da weled ar pez a zo e strad ar mor...

Erwan: Ha goud a rit 'r pez zo 'barz strad ar mor? 'Rit ket, hañ? Serrit ho peg, neuze!

Paotr e akordeoñs: N'eus ket tres beza kontant!

Paotr ar radio: (*O tastum e journaliou*). Laoskit 'hezañ trankil. Lennit ze, deoh da cheñch spered eun tamm.

Paotr e akordeoñs: Gwir eo, heulia a ran Dahud e peb leh. Eur sapre maouez honnez! Huñvreal a ran deusti!... Dahud e Hollywood, Dahud e-touesk ar re zu, Dahud e-touesk ar re velen, Dahud e-touesk ar re ruz... Dahud an diaoulez anezi... Sapre maouez! Bet on bet 'barz Pariz. Skrivet e oa heh ano e peb leh: er metro, war doenn an tier, heh ano skrivet gand gouleier, hed-ha-hed. Bruderez forz pegement: soavon Dahud, lipstick Dahud, chewing-gum Dahud, brasierenn Dahud, loereier nilon Dahud. Spontuz eo ar pezh int deuet a-benn d'ober eur ar vaouez-se!

Den ebed ne zigoro an nor
Nobody will open the door
Personne n'ouvrira la porte.

Ma halon a zo 'giz eur gêr
gouarnet gand eur prizoner
'giz eur gêr eo ma halon,
Piou a zieubo ahanom?

Sellit e peleh 'ma degouezet bremañ. Dezi ar gannaded, dezi ar briñsed, dezi ar bigi, dezi ar pezh a gar. Penndaoulinet eo ar bed oll dirazi. Eur rouanez.

Erwan: (*O tapoud krog ennañ*). C'hwil a zero ho peg, pe ne reoh ket?

Paotr e akordeoñs: Droad 'm-eus da lared ar pezh 'm-eus c'hoant, 'm-eus ket?

Erwan: Droad 'peus da zigori ho peg braz, hag ho-peus! Droad 'peus da grevi zoken. Droad 'peus da lenn forz peseurt lorgnez a gouez etre ho taouarn beteg beza degouezet sod gante. Droad 'peus da zaotra hoh huñvreou ganti. Muzikaner ma reor! Bet 'pefe bet tu da vout eur muzikaner braz moarvad, ya, unan braz zoken, med siwaz ne vloh biken. Biken ne vloh... kar lakeet oh bet e strad eur vag gand ar razed. (*A-daol-trumm*). Ha goud a rit petra eo eur vleunienn? Laret zo bet deoh e oah libr hag ho-peus kredet stard. Azen braz ahanoh! Bremañ p'ema ho koug etre ma daouarn, e kav deoh oh libr c'hoaz? Larit 'ta...

Paotr e akordeoñs: Lezit 'hanon! Sikour!

Paotr ar radio: (*O tispartia aneze*). Deut oh hanter-zod?

Erwan: (*Mond a ra er-mêz paotr e akordeoñs. Erwan o tivoema*). Man Doue! Petra oan 'vond d'ober? (*O hoarzin*). Sellit ouz ma daouarn. Sellit mad: n'int ket re eun tager. N'int ket 'ta! Sellit ouzin: 'm-eus ket penn eur muntre. Roit ho torn din, mar plij! Na lezit ket 'hanon ma-eun. Da beleh 'maoh o vond?

Paotr ar radio: Me zo 'vond d'am labour. Ne joman ket da zoñjal, me! Ne varnan den 'bed: ober a ran ma labour, setu!

Erwan: Eet eo kuit ha setu-me, gand ma fenn ma-unan.

(*Degouezoud a ra eur marhadour, gwisket cheuñ, diskramail, bleuniou gantañ en e zaouarn, eur vleunienn faoz ouz e jupenn, garlanteziou tro d'e houeg. Diskenn a ra a-hed eur skeul war greiz al leurenn. Mezo mad eo. Eur gurunenn gantañ war e benn.*)

Ar marhadour kenta: (*O kana*). Ha rom digedon mamm-gaer,
Il faut d'argent pour bouère

Gast! Du-pod eo amañ. Lakit ar goulou 'ta! (*O koueza*). Tra la la... N'eus den 'bed? Hello baby! Dahud ut ut ut... (*O kana*). Salud deoh! Salud ma mignon ker. Red eo kana ha dañsal. Red eo kared. (*O tañsal eun dañsal modern*). Bezit laouen, bezit laouen. (*War don eur hanitik*)... Red eo chom yaouank. (*O streboti hag oh en em harpa ouz Erwan*). Piou zo 'pousa 'hanon amañ? Ha petra laro an teodou fall goude-ze? Mezo-dall oa: ken mezo hag eur porhell...

An eil marhadour: (*Dond a ra tre, eur voutailad gantañ en e zorn; gand an dorn all e sikour ar muzikaner, ken mezo hag all.*)

Ar marhadour kenta: Salud deoh!

An eil marhadour: Degaset 'm-eus ma mignon ganin. Re a dud zo ba'n neh du-ze. Hemañ zo muzisian: bez e vo unan braz eun devez bennag.

Paotr e akordeoñs: C'hoant 'm-eus gweled Dahud.

An eil marhadour: Med ya, med ya, man denig paour; eun devez bennag e prezantin 'nezi deoh. Hirio 'ma-hi okupet hag hirio zo gouel.

Ar marhadour kenta: Gouel braz zo hirio. Bezom laouen, bezom laouen... (*O tañsal endro*).

An eil marhadour: (*O tañsal gantañ hag o vounta paotr e akordeoñs*). Bezom laouen...

Paotr e akordeoñs: Dahud 'm-eus c'hoant gweled!

An eil marhadour: (*O harpa da zañsal*). Dahud! Faota 'ra dezañ gweled Dahud. C'hwil qar 'barz peleh 'ma-hi, c'hwil?

Ar marhadour kenta: Goud a ran peleh 'ma, med ne larin ket deoh.

An eil marhadour: Gaouier brein!

Ar marhadour kenta: Perag 'ta?

An eil marhadour: En he hiviz 'ma! Hi hi hi! N'eo ket fall, hañ?

Ar marhadour kenta (*O rei eur flahad dezañ war e gein*). N'eo ket fall! Ale 'ta! C'hoarzom. (*O hoarzin*). Harpit. N'ema ket an oll o hoarzin. Krogom endro: 1, 2, 3! (*O hoarzin gand paotr e akordeoñs*). (*Da Erwan*): C'hwi 'peus ket c'hoarzet, c'hwi. Perag 'peus ket c'hoarzet? Perag ne hoarzit ket?

An eil marhadour: Distial a ra...

Ar marhadour kenta: 'Ra ket, trist eo on Aotrou: n'eo ket memez mod. Red eo lakaad 'nezañ drant.

An eil marhadour: Red eo lakaad 'nezañ laouen.

Ar marhadour kenta: Ya, drant ha laouen. Deuit amañ, ma mignon. (*Lakaad a reont Erwan da azeza war eur skaon*.) Ni zo 'vond da lakaad 'hanoh da hoarzin. N'eus nemed an den hag a hell c'hoarzin: al loened n'int ket gouest. Ale, c'hoarzom 'samblez. (*O hoarzin*). N'eus nemed al loened hag ar rouaned na hoarzon james. Diouz ar pezh a welom, n'oh ket eul loen, deom da houd. Perag ne vefeh ket lakeet da roue neuze? Setu amañ eta arouez ho rouaned-telez. (*Lakaad a reont dezañ eur gurunenn war e benn*). Penndaoulina a reom dirazoh e-giz servichourien... Bezit laouen... (*Dañsal a reont hag e teuont da benndaoulina dirazañ ser lakaad dirazañ eur boked, eur chupenn, eur bragou... beteg ma vezont diwisket na re, na re nebeud. Kenderhel a reont da hoarzin, da huchal ha da gana. Bezit laouen... Tra ma reont ze e kuita Erwan e skaon evid mond a-gostez. Heb goud deze e tegouez ar priñs. Kenderhel a reont an dañs keit ha ma ne welont ket anezañ.*)

An eil marhadour: Hep!

Ar marhadour kenta: Petra?

An eil marhadour: Sell 'ta piou!

Ar marhadour kenta: Gast! (*O tapoud paotr e akordeoñs dre e vreh*). Deuit amañ, c'hwi. (*Klask a reont en em lakaad e renk, ser saludi anezañ, doare an arme.*)

An oll: Salud... Kapten... Komandant...

Ar priñs: Eun tamm kempenn, mar plij! Laret 'm-oa deoh beza laouen, med 'm-eus ket pedet 'hanoh war ma bag evid dislonka hed-ha-hed. Eur vag vakañsi eo homañ ha n'eo ket eur hraou moh. Ac'h! Peseurt c'hwez fall zo ganeoh!

Ar marhadour kenta: Ganin-me?

Ar priñs: Ganeoh-c'hwi. Flêria a rit e-giz eur broh. (*D'egile*). Pa zoñjan oh bet krouet diouz skeudenn an Aotrou Doue! (*C'hoarz sod an eil marhadour*). Laouen e tle beza an Aotrou Doue pa 'n em wel en e skeudenn! Ma n'eo ket eun druez! Ha hemañ, euz peleh 'ma 'tond?

An eil marhadour: Ma mignon 'n hini eo. En em gavet 'n-eus ganin 'barz an eskalier tuchantig.

Ar priñs: War an tu diskenn 'ma-eñ neuze!

An eil marhadour: Sikour a rin 'nezañ da bignad endro.

Ar priñs: Kement ha pignad, kit d'an neh. Bremaig vo red dañsal. Ha bezit drantoh 'vid ze! Bezit laouen: c'hoarzit! (*O hoarzin glaz*). Pas mod-se, pennou brell! Laouen, 'm-eus laret deoh. (*Mond a reont er-mêz*). Moh 'neze toud!

Erwan: (*O vond da vanka e hent d'ar priñs*). Gwaz a-wal e vefeh? Setu eur gontell. En em zivennit.

Ar priñs: Petra faota da hemañ?

Erwan: Dibaoe 'maon o hortoz ar momant-mañ. Hirio e welin hag-eñ 'peus gwad en ho kalon. Gwaz oh, n'oh ket?

Ar priñs: Petra gav deoh e vijen?

Erwan: Na glaskit ket kemer an hent treuz. Paket vloh ganin hirio. Tuchantig e ouezin piou oh.

Ar priñs: Digorit ho taoulagad: n'eus maskl ebed ganin war ma fas. Piou bennag a wel sklêr a oar piou on.

Erwan: Dibaoe 'm-eus gwelet 'hanoh evid ar wech kenta, e kavan 'hanoh da vanka ma hent. Pe den pe diaoul e vefeh, bremañ 'maom tal-ha-tal. Red eo kaoud eun termen.

Ar priñs: Eun termen gand ar gontell? On c'hoari a yafe da zroug. (*O hoarzin*).

Erwan: Delit. Gwelloh e kavan mervel e-leh beva e-giz ma ran.

Ar priñs: Kompren a ran 'hanoh. En em zistruja vez greet deuz se, vez ket?

Erwan: En em zistruja, pe laha. Unan 'hanom on-daou zo re amañ. Delit.

Ar priñs: 'Rin ket.

Erwan: Delit, pa laran deoh.

Ar priñs: 'M—eus ket c'hoant.

Erwan: Digalon. E penn ma hontell ema ho puhez. Daoust hag e vo red din diwada 'hanoh? Divennit ho krohenn!

Ar priñs: 'Rin ket. N'en em bilan ket gand seier eskern. Ale, roit eun taol kontell din, deoh da weled hag—eñ 'm—eus gwad em halon. A! A! A!... Med, ha n'am—befe kalon ebed? Aon 'peus, daoust deoh beza eun tasmant hoh—eun. (*O hucha!*) Dihunit! O huñvreal emaoch c'hoaz. O kousked emaoch. Digorit ho taoulagad eun tammig 'ta! A! A! A!... Krenet 'peus hag ho—peus. Aon 'm—eus greet deoh. Goud a rit piou on bremañ? A! A! A! A!...

Erwan: Bernnoz e stourman a—eneb deoh. Tourmanti a rit ma halon kement hag hini Dahud.

Ar priñs: Tourmanti he halon! Goulennit diganti 'ta! A! A! A! Kila a rit bremañ, koulskoude **c'hwi** a zo deuet d'am haoud ha n'eo ket me.

Erwan: Diaoul ahanoh!

Ar priñs: Klask a rit divinoud piou on, padal e ouezan—me piou oh. Glan ha sklêr oh evel gwer ma faour—kêz tasmant. Gouest on da lenn e leor hoh ene. Diouz a welan, ne blijan ket pikol deoh? Koulskoude e karan ahanoh.

Erwan: Lezit ahanon!

Ar priñs: (*Gand teneridigez*). Perag e kilit dirazon mod—se? Ale, setu 'maoh o ouela bremañ! Gouelit! Leñvit! Ober ra vad d'an den. C'hoant am—mije gouela ivez, med siwaz eet ma daerou da hesk. Dizehet eo ma halon. Den 'bed ne gar 'hanon ha ne garan den ebed. Ma hellfen—me kared ivez, na pa vefe eur wech.

Erwan: Kit kuit! Tehit kuit euz amañ!

Ar priñs: Gouelit ho kwalh: 'peus ket da gaoud mez. Mond a rin kuit tuchan—tig 'samblez ganeoh.

Erwan: Pas 'samblez ganin. Lezit 'hanon ma—unan—penn.

Ar priñs: Deoh da huñvreal endro... Paour—kêz Erwan. Ha setu echu e huñ—vre. Evid dont a—benn da veva e huñvre e—neus tremenet e dammig amzer da huñvreal. Ha setu m'ema degouezet koz—ridet dija heb beza bet kemeret e amzer da veva... Petra eo ho huñvre a—benn ar fin? Kontit din! Kontit din diwar ho karantez.

Erwan: Dahud! Petra 'peus greet—**c'hwi** deusti?

Ar priñs: Goulennit diganti petra 'deus—**hi** greet deustoh kentoh.

Erwan: C'hoant 'm—eus gweled 'nezi eur wech c'hoaz. Eur wech na pa ve kén! Gevier a larit.

Ar priñs: (*Didruez war eun taol*). Ne ran ket. 'Ran ket james. Ganin vez bepred ar wirionez. Eur wirionez dall. Splann ema dirazañ evel eun heol. Rosta a ra daoulagad piou bennag hag a zell outi. Hag ar zod dallet e zaou—lagad a nah gweled ar sklêrijenn, a nah gweled ar wirionez. Esoh eo, neketa? Med amañ 'maon bepred. Bet on bet a—viskoaz hag e vin da viken. En deñvalijenn. Gweled a ran sklêr eno, spial a ran. Gortoz a ran hag e vezan treh. Bepred e vezan treh. Anavezet a ran pep hini 'hanoh. Kosoh on 'vid ma soñj deoh, n'on ket 'ta? (*Sioul eur pozad*). Mond a ran da lared deoh ar wirionez. Med marteze 'peus divinet. 'Barz Kêr—lz e oan, gwir eo. O hortoz 'hanoh. Aozet 'm—oa peb tra en a—raog. Ne oah nemed eun oustaill etre ma daouarn. (*C'hoarz*).

Erwan: N'eo ket gwir. Libr e oan. Choazet 'm—eus ma hent.

Ar priñs: Hag ho—peus, Erwan. Gwir eo e oah libr. Moyenn vije bet deoh choaz eun hent all. Eun termen zo da gement hent a zo. Par d'eur chaseour o jiboesaad am—eus gedet 'hanoh, paour—kêz denig bihan gand eur galon vraz ha gwad birvidig, fiziuz en amzer da zond. Souezuz eo bevañs an dud, pa zoñjoh ez eus tu da lenn o amzer—da—zond war o fas, e pleg o daouarn, beteg memez hent ar stered ha daoust da ze e chomont libr: libr d'ober ar pezh 'deus—int c'hoant. Iskiz ha fentuz eo boud eun den memestra! (*C'hoarz*). Ha setu echu an abadenn... Poent eo deoh ober ho koñchou, Erwan, bet 'peus bet eur vuhez nemeti hag ho—peus he c'hwitet.

Erwan: Dahud!

Eur vouez: Priñs!

Ar priñs: Chitt! Selaouit! Urñan bennag zo o klask war ma lersh.

Eur vouez: Priñs! Peleh 'maoh, ma friñs?

Erwan: Piou eo?

Ar priñs: Unan vezo, leun a buñch. Leun 'giz eur baraill prest da darza. Eur follez koz! Dont a ra d'am heul. Klask a ra war ma lersh. Me, ne fell ket din gweled beg he fri kén. Erru on skuiz ganti, skuiz maro. C'hoant 'mefe boud ma—eun.

Eur vouez: Hello, priñs! Alo! 'respontit 'ta!

Ar priñs: Tostaad a ra.

Erwan: Piou eo? Dahud 'n hini eo, n'eo ket?

Ar priñs: C'hoant 'peus gweled 'nezi. Lezel ran 'nezi ganeoh, evid distrei d'an deñvalijenn. (*Dond a ra Dahud, ar varhadourien d'he heul. Kosaet*

o—deus, ha mezo—dall ouspenn).

Dahud: Priñs! O Kapten! Mahomer dous! E peleh en em guzit, penn—boh? Pa vez pedet tud vez red chom gante. N'eo ket echu an nozvez c'hoaz. Hopala, tud vras! Deuit amañ, man dousig! O! kavallour tomm e reor: deuit hag e vin ho kazeg ruz. Mond a rim a—dreuz an noz, kemmesket on bleo en avel. Ar glaou e vin ha c'hwi an tan. Dispar e vo ar veaj hag a rim 'samblez... ma friñs! Med koz on deuet da veza bremañ hag en em guza a rit. E peleh 'maoh? Tehi a rit kuit dirazon, Priñs charmant! Pe neuze, aon 'pefe deuston? O farsal emaoch ganin? Ma friñs! 'Barz peleh 'maoh?

Erwan: Petra 'deus—int greet deustoh?

Dahud: Klaskit war—lerh ma friñs ha kavit 'nezañ.

Erwan: Dahud!

Dahud: Petra zo ' hoari ganeoh, paotr brao? Trist oh ivez?

Erwan: Dahud. Ha soñj 'peus? Ha soñj 'peus 'hanon?

Dahud: Priñs. Red e vo din harpa da vutuni. 'Maon prest da darza. C'hoant braz 'mije lammad, dañsal 'pad an noz gand houlenn ar mor brao, din d'en em goll ganti, an eonenn o floura ma horv beteg dihun ma flijadur. C'hoant 'mije en em zistruja, dond da besk o neual er mor, libr ha digabestr... D'al lark. Ha me d'ar stur.

Erwan: N'it ket: a—hend—all vim kollet avad.

Dahud: Me zo e penn an traou amañ. Toud an traou zo din. Pêet 'm—eus. C'hwi n'oh mann 'bed amañ. Mod—se 'ma ha n'eo ket mod all.

Erwan: Ha soñj 'peus 'hanon 'benn ar fin?

Dahud: (*D'ar varhadourien*). Kasit hennez da strad ar vag. Laret eo. Kuit ar priñs, me e penn an traou. Priñs! Priñs! Peleh 'maoh? (*Mond a ra er—mêz*)

Ar priñs: (*O hoarzin*). Heb kenavo, Dahud! 'Doa ket soñj ahanoh kên 'nezi. Deuet eo koz, gweled a rit. Ma ne garit ket 'nezi a—walh kên, e varvo. (*Skopa ra ar priñs d'e fas. D'ar varhadourien*). Laoskit hemañ da vond ha kit d'e heul. Ha setu ar zodez e penn ar stur, ar vag ouz ar garreg a yelo sur.

Erwan: Pegen euzuz oh! Red eo ampech 'nezi d'ober ze.

Ar priñs: N'eus nemed eun dra d'ober neuze.

Erwan: Petra 'ta?

Ar priñs: Kit d'an neh du—ze, gand ar gontell—mañ, ha lahit 'nezi, kemerit he flas er stur ha chañchit hent dioustu. Ale! Red eo sakrifia 'nezi. Perag 'chomit da dermal?

Erwan: Laha 'nezi?

Ar priñs: Degas a ra aon deoh, ra ket? Red eo dezi mervel, pe neuze e vo red **deom—ni**. Na chomit ket da zoñjal bremañ. N'eo ket ar mare. Deuet eo ar mare **d'ober**. Libr oh eur wech ouspenn: saveteit ahanom oll.

Erwan: Kreñvoh oh evidon. Sorset 'peus 'hanon beteg boud treh.

Ar priñs: Kit dezi!

Erwan: N'in ket.

Ar priñs: Paotr digalon, evitañ e—unan. Penn brell ganet! Petra eo ar vaouez? Ma ne faot ket deoh savetei ar bed, saveteit ho krohenn d'an nebeuta.

Erwan: N'am—eus den ebed da zavetei.

Paotr ar radio: (*O tegouez*). Kabiten! 'Maom o vond d'ar strad! Difluka ra an dour e bourz—drefiv ar vag. (*Da Erwan*). Ar vaouez vezo an hini eo. (*Korn bual*). Dahud! (*Mond a ra er—mêz paotr ar radio*).

Erwan: (*Mond a ra er—mêz*). Dahud! Dahud!

S.O.S. (e mors).

Ar priñs: (*Goude beza bet dastumet e draou all, lesket gand ar varhadou—dourien*). Muzik! Muzik vraz da darza.

(*Teñvalijenn*)

C'HWEHVED ARVEST

(Skubet eo ar mor gand gouleier an touriou-tan. E penn eur plankenn ema Erwan hag er penn all Dahud. C'hoari gand ar gouleier hag an deñvalijenn, evel eun doare branskell).

Dahud: Ha bremañ neuze.

Erwan: Ha bremañ 'ta!

Dahud: Ha bremañ, p'ema' c'hwezet an tan en douar ha devet peb tra tro-dro dech. Bremañ 'ta en em gavit gwelloc'h?

Erwan: Bremañ p'emaom ma-eun ganeoh; bremañ p'ema eet ar re all kuit; ha kared a rit 'hanon?

Dahud: Azen ahanoh! *(O hoarzin).*

Erwan: Dahud, sellit deuston. P'emaom tal-ha-tal, sellit e-kreiz man daou-lagad. P'emaom kên tost euz ar maro, larit din eun dra: ha kared 'peus bet greet ahanon?

Dahud: Biskoaz 'm-eus bet karet 'hanoh, Erwan.

Erwan: Ha me: a-viskoaz ha da vikén.

Dahud: Ar baradoz, Erwan.

Erwan: An ivern kentoh, Dahud. *(O vranskellad. Hi o hoarzin).*

Dahud: A-viskoaz, da vikén.

Erwan: Digalon.

Dahud: A-viskoaz, da vikén.

Erwan: E peleh 'maoh? O klask 'maon war ho lerh.

Dahud: Biskoaz!

Erwan: Echu gand ho c'hoari?

Dahud: Bikén. Keit ha ma karoh 'hanon e vevin da vikén. A-viskoaz ha da vikén! A! A! A! (*Goulou kriz, muzik sirk; dond a ra ar priñs tre gand eur foet ser strakal 'nezañ*).

Ar priñs:

Setu bremañ digor ar c'hoari
setu digor dañsou an douar.

An nerz,

An argant,

Ar ouenn,

An ampled, an dregantad,

Toud ar pez a zaspugn hag a gresk;

Ar pez a vez kontet, ar pez a ra nerz ha kreñvijenn,

Ar pez a flastr hag a lah: ar gevier.

Ar brobagand – an naon – ar brezel. (*Trouz muzik*).

N'eo an den nemed boued fuzuill.

Lahit ho tad, ha lahit ho mamm,

Flatit ho tad ha kit war-raog.

'Mêz euz bouzellou on douar

Petrol tan ha dir,

Devit, rostit, distrujit on aoteriou.

Gand ar gwad eo hag a vez

skrivet on Istor.

Sehed deuz on douar

Gand ma teufe mezo a-walh

da drei ha da drei

ha da drei
digoret eo ar skluziou...

(C'hoari etre: pladenn rayet, c'hoari goulou touriou-tan o trei. Dahud hag Erwan a zo bepred skourr ar pezh a chom deuz ar peñse. Dahud badaouet, Erwan skuiz-marzo. Trouz kirri-nij o nijal en oabl.)

Erwan:

Ha bremañ

p'ema kollet oll,

P'emaon amañ stag ouz ar peñse-mañ, skuiz-marzo,

An oabl a-uz din, hag an douar dindannon,

ha tro d'am horv an dour sklask oh en em zila e-barz ennon,

Devet gand ar zehed eo ma goug,

Tan dalhmad o tevi kreiz ma halon,

Kaset ha digaset euz eur vro d'eben

Gand chal ha dichal ar bed,

Balañs etre ar vuhez hag ar maro,

Etre ma harantez ha ma dizesper.

War ar peñse-mañ, o kempoueza 'hanon dalhmad war valañs ar justis.

Deuz eun tu: pouez ma fehejou;

Deuz an tu all: pouez ma harantez.

Gand an nerz o sach a 'hanon dre an neh ha dre an diaz.

Ar goulou hardi war ma lerh, o talla man daoulagad

'vel ar vatimant goude an tempest o klask he hent d'ar porz.

Poent braz eo din ober ma hoñchou,

Rostet gand an heol, sklaset gand an dour, mouget gand an êr, gortozet gand

an douar,

Lapoused ar maro o skrignal en oabl

E plad ar memez balañs, fas din ema ar vaouez visteriuz.

Kared 'm-eus bet greet he horv marvel

ha bet eo bet Din-me

Ha da lod all eo bet ivez

heb ma tihanfen da gared 'nezi,

Kar ar pez a garen enni ne oa hag he horv daoust dezañ boud brao.

nag an droug deus-hi greet daoust dezañ boud euzuz.

Setu-c'hwi hag ho mister,

Dirag ho tribunal vo red diñ mond,

paourroh evid d'an deiz 'maon ganet,

mamm ebed da luskellad 'hanon,

toenn ebed d'am goudori.

Skopet 'm-eus ouz fas ar bed,

Distaolet on bet gand ar bed-oll dre faot ar hoz maouez-se,

Nahet 'm-eus bet savetei ho Kêr-lz.

Med daoust hag e vefe unan dign 'walh da zigori leor ho polonte,

dign da vout eur benveg etre ho taouarn ollhailoudeg

hag unan a gredfe boud.

Ha bremañ p'ema-hi dirazon,

Di-elfenn ha gwenn he daoulagad evel re eul loen kaset d'ar maro

Aotrou Doue, kaoud ar vadelez da nompaz dilezel 'nezi.

Ma tie ho justis poueza war eun tu euz ar balañs,

Ra vezo euz an-tu-mañ,

Ra deho kuit an drôg pell diouti,

Ra vezo kannet heh ene.

(Branskellad a ra ar plankenn, eur griadenn: « Dahud! Erwan! ». D'ar strad ez eont o-daou en eur glask mond an eil daved egile).

EPILOG

(E Kêr—Iz: an dud, daoust dezze boud an heveleb re, a zo cheñchet 'neze. Gand pempigou e hoari an hini zod. Dillad paotr ar radio a zo gand ar gedour. Eur fleurenn vraz spontuz hag eur voutaillad champagn a zo gand ar varhadourien. Dao d'an dud roi da zoñjal ez int tud an douar gand o dillad pe gand o rikou. Tal—ha—tal ema azezet Dahud hag Erwan war bazennou an aoter).

Ar beleg: Piou 'n—eus c'hoant respont an overenn?

Ar foll: Unan, daou, tri, pevar, pemp ha hopala!

Ar gedour: Digoret eo bet ar skluziou! Digoret eo bet ar skluziou!

Ar vaouez: Ma merh! Ma merh!

Dahud: Peleh 'maon?

Erwan: 'Barz Kêr—Iz.

Dahud: Piou eo an dud—mañ?

Erwan: Pobl Kêr—Iz: ho pobl.

Dahud: Oh ober petra 'maint?

Erwan: O hortqz.

Dahud: Riou 'm—eus. Eun huñvre hir 'm—eus greet, 'm—eus aon. Glan en em zantan 'giz eur vamm ganet bugel dezi. Gand daoulagad nevez e welan ar bed endro. Huñvreal 'm—eus greet. Eur gwall—huñvre an hini oa. Aze oah tre ma oan oh huñvreal.

Erwan: Ganeoh e oan o huñvreal.

Ar priñs: (O tondeuz a-bell hag o helver Dahud. Redeg a ra 'vel eun den zod; harpa ra dianal evid krial.) Dahud!

Dahud: Piou eo hemañ?

Erwan: Priñs ar bed.

Dahud: N'anavezan ket 'nezañ.

Ar priñs: (O vond kuit. Kemeret 'n-eus e anal. Tremet a ra dirag Dahud heb gweled den ebed. Mond a ra 'mêz sar gervel.) Dahud! Dahud!

Dahud: Dall eo pe betra?

Erwan: Ne hall ket gweled 'hanoh kên.

Dahud: Trist eo beza dall memestra!

Ar foll: (O tiskenn da zastum e bempigou).

Dahud: Piou oh-c'hwî? Gwelet 'm-eus 'hanoh eun tu bennag dija.

Ar foll: (O vousec'hoarzin). Selaouit! (Taol gong). O tegouezoud ema.

Eur vouez: (Eun taol gong). Degouezet zo unan bennag, trei a ra an amzer endro.

Ar belec: (Goude tostaad euz tu 'raoq al leurenn). (D'an arvestourien): Piou 'n-ije c'hoant respont an overenn?

(Ograou).

ECHU

Leoriou e gwerz e ti BRUD NEVEZ

KUZULIOU AR MEDISIN : 10 lur.

Mikael Madeg : PEMP TROAD AR MAOUT : 30 lur.

Jakez Riou : GEOTENN AR WERHEZ : 34 lur.

« : AN TI SATANAZET : 15 lur.

« : Nominoc-oe : 18 lur.

« : Gorsedd Digor : 18 lur.

Per-Jakez Helias : MEVEL AR GOSKER : 15 lur.

TAN HA LUDU : 15 lur.

Tad Medar : AN TRI AOTROU 50 lur.

Goulennit roll klok al leoriou a zo e gwerz.

BRUD NEVEZ, 6, ru Beaumarchais, 29200, BREST

